

Feiz-ha-Breiz



GWENGOLO 1927

■ ■ ■ ■ ■ ■ ■ ■ ■ ■

Brezoneg er Skoliou, pelloc'h !

Ger kement hini a deui da Vleun-Brug Montroulez d'ar 15 a viz Gwengolo a zeu

FEIZ HA BREIZ



- EO
- KOSA
- KAERA
- HA MARC'HADMATA
- KANNAD MIZIEK SKEUDENNET
- A C'HELL KAOUT
- AR VRETONED

FEIZ HA BREIZ a vezo kalz kerc'h c'hoaz; kreski a ralo cus an hanter; e vent a vezo an hini a voe roet d'ezan pa voe krouet, er bloaz 1865, hag a viras epad 19 vloaz. Diouz e vezo n'eo ket hepken **D'AR PETAZ BREUR**, da lavaret eo da vrezonag Leon, da hini Treger, da hini Kerne ha da hini Gwendal, met ivez da hini Bretoned Breiz-Uhel o deus rak-let deaki brezonag, nann, slouaz, war harlem o mammoù, met el levrioù; daoust da-ze, gwelet a reoc'h, e ouzont en em denna gantan bras hag hep dale Breiziz a ouzo en em glevet cus an eil penn d'egle da Vreiz ha n'o devozo ken etrezo nemed eur feiz, eur yez, eur galon.

FEIZ HA BREIZ a ralo **TRO VREIZ**; embann a ralo, gant toallennoù dispar, studiadennoù war hon Iliadocemen, hor chapelloù, hor c'harvatioù, hon tenorioù a bep stumm hag a bep danvez; peadra a vezo gantan da ober en levr evel ma n'eo ket bet moulet c'hoaz hini chet ker kaser e brezonag. N'eo ket 40 skrivagner eo a skrivio ennan er bloaz 1927, met 50, da nebeuta.

Daoust da-ze e vezo ker marc'had mat ha hiskoaz. Da gemeret en hor mouleuz pe en hon **des-gwerz**, diouz an niverenn, ne gousto nemet 4 real hepken.

Da gemeret, diouz ar bloaz, pa ne gemeret nemed un niverenn hepken, eo 13 lur ha 10 lur hepken, dre bez, pa gemeret da nebeuta 5 niverenn.

KOUMANANTIT DA FEIZ HA BREIZ
HIZIO KENTOC'H EBIT WARC'HOAZ

O kas ar priz anezan hag hoc'h adrez, dre ar post, d'an A. Gergelin, 4, rue du Château, Brest C/C 44.40, Rennes. Kennav, lennerien vat ha krenvroz ker, ha bennoz Douz d'oc'h.

Plougerne, d'an 8 a viz Kerzu 1926.

Y. V. PERROT,
Rener e Feiz ha Breiz.

FEIZ HA BREIZ a gav der ziher e kement ti kristen e vez honzet ennan brezonag.

D'an 12, 13, 14 ha 15 a viz Gwengolo a zeu eman gouelioù bras ar

Bleun-Brug
 e
Montroulez

Breiz-Izel ha Breiz-Uhel
Breiz-Veur hag Iwerzon
 a vo eno.

XVII^e Congrès du Bleun-Brug
 Sous la présidence de M. le Docteur CORNIC, président général
Les 12, 13, 14 et 15 Septembre 1927
A MORLAIX

Le lundi 12

A l'arrivée du rapide de Brest (9 h. 15) excursion en autocars de Morlaix à Roscoff avec halte à Garantie (réception par le Touring-Club) et à Saint-Pol-de-Léon (visite au Monument des Morts, cantique à N.-D. du Kreisker, procession du Kreisker à la Cathédrale, vénération des Reliques, explications historiques et artistiques, déjeuner à Roscoff). — Retour par Kerouze, Kermenguy (Hommage du Bleun-Brug à Mme la Comtesse de Kermenguy, veuve du premier président du Bleun-Brug; au cimetière de Cleder dépôt d'une gerbe de bruyères et prière sur la tombe de M. le comte de Kermenguy), Kergourndec'h, Saint-Vougay, Kerjean, Berven, Lambader.

— A 20 h. 30, dans la maison de la Duchesse Anne, vin d'honneur; réception de M. le Président général du Bleun-Brug; allocution de M. Chevillotte, président du Bureau régional du Léon; réponse de M. le Docteur Cornic; concert breton. (Entrée: 3 fr.).

Le mardi 13

A 9 h., au patronage de Saint-Martin, réunion du Comité Directeur et des Bureaux régionaux du Bleun-Brug.

A 10 h., réunion de l'Académie bretonne sous la présidence de M. E. Ernault, Professeur à la Faculté des Lettres de Poitiers.

— A la même heure, visite de Morlaix sous la direction de M. Gourvil, secrétaire du Syndicat d'initiative.

— A 14 h., Séance d'étude: les relations extérieures du Bleun-Brug; utilité et organisation d'une action commune des militants régionalistes et fédéralistes en faveur des propositions de loi Walter-Muller et Seltz sur les Libertés provinciales et sur l'enseignement bilingue dans l'école primaire. — Rapporteur: M. Léon Toulemon, secrétaire du Bureau régional du Léon.

A 16 h. 30, excursion en autos-cars à Saint-Thégonnec et Guimiliau.

— A 20 h. 30, au patronage de Saint-Mathieu, séance récréative, sous la présidence du délégué flamand, M. J.-M. Gantois, président de Vlaams Verbond van Vrankrijk.

An *Ankele'her*, par la Troupe Paotred Mikael an Nobletz. *Salk ar Paotr Iva*, par la Troupe de Locquénolé. *Allocution de M. le Président.* *Exécution des hymnes flamand et breton.*

Le mercredi 14

A 9 h., au patronage de Saint-Martin, 1^{re} Assemblée générale; rapports sur l'Education Bretonne de l'Enfance:

- 1^o Dans la Famille, par M. Le Nesleur, président du Bureau régional vannetais;
- 2^o A l'école, par M. le Chanoine Grill, inspecteur de l'enseignement libre dans le diocèse de Quimper et de Léon;
- 3^o Dans les œuvres post-scolaires, par M. l'abbé Urvoay, docteur en théologie, vicaire à Perros-Guirec.

— A 14 h., 2^e Assemblée générale: suite des rapports sur l'Education Bretonne de l'Enfance:

- 4^o En vue de la Profession, par M. H. Quilgars, correspondant régional de la « Revue économique de l'Ouest »;
- 5^o Vers une organisation bretonne de l'école, par M. l'abbé Madec, secrétaire général du Bleun-Brug.

— A 16 h. 30, excursion en autos-cars à Primmel-Trégastel et Saint-Jean-du-Doigt.

— A 20 h. 30, au patronage de Saint-Martin, séance récréative sous la présidence de M. l'abbé Valentiny, directeur de la *Lothringar Volkskretzung*, et de M. le D^r Cuny, professeur au Petit-Séminaire de Montigny (Metz).

Trubuilhon ar 7 paotr yaonank, par la Troupe des « Paotred an Arvor ».

En Ereden e Bro Guéned, chantée par les Chorales de Saint-Jean-Brevelay et de Pluvigner, expliquée par l'auteur, M. l'abbé

J. Maréchal, curé-doyen de Pluvigner (pays de Vannes). *Allocution de M. l'abbé Valentiny.* *Exécution des hymnes breton et breton.*

Le jeudi 15

A 8 h., en l'église de Saint-Mathieu, messe du Congrès chantée par M. le Chanoine Müller, assisté de MM. Valentiny et Gantois; allocution de M. le Chanoine Pichon, curé-archiprêtre; chants bretons sous la direction de M. l'abbé Hervé, organiste; Salut du S. Sacrement.

— A 9 h., au patronage de Saint-Martin, concours de lectures, de chant et d'éloquence.

— A 13 h. 30, *Cortège des Enfants Bretons*, en chars fleuris, au chant des hymnes nationaux. Rassemblement des chars dans la cour de l'école de N.-D. du Mar (Route de Plourin).

— Réception des Enfants Bretons à la Maison de la Duchesse Anne. — Défilé vers le parc de Coatserho.

— A 14 h. 30, au parc de Coatserho, grande représentation de chœurs, sous la présidence de M. le Chanoine Müller, sénateur de l'Alsace.

An *Nevez Amer*, de R. Hénon, par la Troupe de Plougerneau. *Danvez bretonnes*, par les Troupes de Douarnenez et de Pont-Croix.

Tog Ioni, par la Troupe de Pont-Croix. *Passe-pied Cornouaillais.* *Ar Blagorn.* *Fragments de En Ereden e Bro Guéned.* *Sala. de l'Alsace à la Bretagne*, par M. le sénateur Muler. *Allocution de M. le Président général.* *Serment solennel de fidélité à la Patrie Bretonne.* *Exécution de l'Hymne national.*

N. B. — a) Toutes les séances de travail se tiendront au patronage de Saint-Martin et seront présidées par M. le Docteur Cornic.

b) La Musique municipale de Morlaix et un groupe irlandais de joueurs de cornemuse, en costume national, prêteront leur concours aux Fêtes du Bleun-Brug.

c) Le Bureau Central du Bleun-Brug prévient MM. les commerçants et hôteliers qu'il ne répond que des Bons portant la signature de M. Chevillotte, président et le cachet du Bureau Régional du Léon.

d) Seules, les publications du Bleun-Brug, ou autorisées par lui, seront mises en vente dans les salles du Congrès et les cours attenantes.

e) Le prix de l'excursion du lundi — repas compris — ne dépassera pas 25 francs. Les personnes désireuses d'y prendre part voudront bien aviser de leur intention M^r Xavier Cosmelet, notaire à Morlaix. — Même adresse pour les renseignements concernant les repas et les logements.

Pour se renseigner exactement sur les Bats, la Doctrine, le Programme et les Méthodes du Bleun-Brug, lire LA PATRIE BRETONNE qui paraîtra le 10 Septembre sous la direction du Bureau Central du Bleun-Brug.

D^r CORNIC,
 Président du Bleun-Brug.

O. CHEVILLOTTE,
 Président du Bureau régional du Léon.

Na brenit ket arreburi araok beza bizitet ar
Stal-labour vras war an Arreburi
 giz-Vreiz, giz-vreman, giz Lociz XVI ha giz koz



Ti Loeiz QUEMENEUR

Kizeller-koad Breizad
 Savet e 1906

Eun dibab bras a gamchou-gweleou, — Saliou dibri
 a bep doare.

Arreburi evid a dud a zivar ar maez.

Hor staliou gwerza ha diskouez a zo 215 ru Jean Jaurès
 (diskenn ar c'har-tram e an Bat gouteux - Quatre-Moulins)
 e KERBER (Sant-Per-Kilbignon) tost da Vrest.

Téléph. 8-03 Brest.

Tud an ti a oar brezoneg.

Red-mat eo d'eoec'h dont da welet!

Kaset e vezo ho prenadennoù d'eoec'h dre tumporell-dre-dan.

Hangars agricoles métalliques
 Charpentes métalliques Serrurerie d'Art
 Ponts en fer Toutes pièces forgées
 Tour et estampées.
J. BERTHOMIER
 Constructeur
 90, rue Jean-Jaurès, BREST Tel. 2-75
 Fermetures de magasins Silos métalliques
 Persiennes en fer à tonrages « Gautier »
 Grilles articulées Représentant des Ateliers et Fonderies
 Moto-charge et monte-plats Gustin Als, Paris.
 Représentant de la Maison Japaneau et Moreau, Paris.
 Tous projets et devis gratuits sur demande.

Ti kos L'OLLIEROU - L'Hostis et Jorde, duñ war e lerc'h
 18, 27, Straed Louis-Pasteur - BREST R. C. 344
 Pa ho pezo eun dra bennak da breza, dalchit sonj er eo en hon ti e
 kavoc'h alio ar ruz da post hag an tressoù reza e monchoerou ha ta-
 vañchou breizad. Serez, maez ha savet e bep laer.
 D'oc'h doare ar varchedourez an tman a wez gwelloc'h-marchad
 eget h'uz touz peñsk boll.
 Euz eskomp a agont real dre gant a vez rest e marc'hadourez ha dek dre gant
 d'ar familhou breizad.

GARAGE CENTRAL
 DU RUSSEC et C^{ie}
 17, Straed Jean Jaurès, BREST — Téléph. 8-51
 Gouezrien ar maroù:
 DONNET-ZEDEL - DELAGE
 CHENARD-WALCKER - ROCHET-SCHNEIDER
 11 CV ha 7 CV DONNET-ZEDEL
 a c'heller gweliet ha prenañ rakal er stal
 Stock Michelin
 Labourdeg stummet eus ar gwella evid noza mat ha buan an
 holl givri dre dan
 Ar c'hiltri chomet a-zañ war an hent a vez disac'het ganeomp
 war ar vel hag ar gouezioù

Quincaillerie HAUTIN
 (Maison fondée en 1880)
Louis BERTHELOT
 SUCCESSEUR
 102, rue Jean Jaurès et rue Saint-Martin
 Téléphones 1-36 BREST (FINISTÈRE) R. C. Brest 3348
 Grand choix d'appareils de Chauffage
 Articles de Ménage - Eclairage - Articles de Bâtiment
 Toiles cirées et Nappes

Stal-labour karonez. Dibrezere ha livrez
 R. C. Brest 2329 Téléphone 25
Ti Frédéric LAURENT - LANDERNE
 23, 25, 27, Straed an Tour d'Auvergne - LANDERNE
 An itron intañvez LAURENT war e lerc'h
 Dreist evid ar gwetarioù skañv war rojou kele'hiet-
 gom. Roue-Carte ha frotterezek kirri-saoz, gardens.
 Rojou kele'hiet-gom a bep Seurt. Ar Rojou kele'hiet-houarn
 a vez laketañ ganeomp da rojou kele'hiet-gom.

FEIZ HA BREIZ

KELAOUENN VIZIEK GANT SKEUDENNOU
 Renet gant Y.-V. PERROT

TAOLENN AR MIZ


SULIOU HA GOUELIOU AR MIZ

Galvadenn da Vreiziz, Y. AN MOAL, p. 174. — An teodou
 beo, Y.-V. PERROT, p. 175. — Feiz, p. 176. — Hor
 breudeur Tramor, YANN KOSTARBUEN, p. 179. —
 Lok-Ronan, G. P., p. 183. — Mikael an Nabeliz,
 J. U., p. 186. — Al labour-douar, O. CHEVILLOTTI,
 p. 188. — Wardedo ar re glanv, ar medisin, p. 190. —
 Keleier, p. 191. — Rajennad Breiz-veur ar Bre-
 zoneg, F. VALLÉE, p. 192.

4 a viz Gwengolo. — XIII^{me} sul goude ar Pantekost
 ofereñn ha gousperou ar zul-ze.
 8 a viz Gwengolo. — Glinvelez ar Werc'hez Vari. Gouel
 devozion.
 11 a viz Gwengolo. — XIV^{me} sul goude ar Pantekost
 ofereñn ha gousperou ar zul-ze.
 18 a viz Gwengolo. — XV^{me} sul goude ar Pantekost
 ofereñn ha gousperou ar zul-ze.
 25 a viz Gwengolo. — XVI^{me} sul goude ar Pantekost
 ofereñn ha gousperou ar zul-ze.

Komzou eur Montroulezad

a zavas *Les Vies des Saints de la Bretagne Armorique*
 a la mémoire de nos Saints Patriotes



Shoued Jakob Le Grand hag
 Anna Nabeliz e Vreiz, lak ha
 munn Albert Le Grand, a
 welet e-harz eus eun li, war
 eñ Treger, e Montroulez.

Proverbe, à tondre sur un œuf, mais je me fais gloire
 de leur disgrâce et d'être persécuté de tels libertins et
 Anti-Bretons, rendant ce service à l'Eglise et à ma pa-
 trie, à la confusion des ennemis de l'un et de l'autre,
 et eux bien qu'ils sachent que, pour plaire à Dieu et
 aux gens de bien, il me plaît de leur déplaire leur don-
 nant pour reste de paiement ce distique, emprunté de
 la plume d'un Docteur personnage du temps.

Qui ridere nihil nisi noverit, audiet is moxi:

« Carpere vel noli nostra, vel ede tua. »

1. nov. 1636.

Albert LE GRAND.

Mab Maner Kernegez



Skeud Philip Keat-Kia

Philip Keat-Kia, mab Kernegez, e Montroulez a
 voe anvet da eskob e Kastell Paol d'ar 16 a viz Here
 1419, gant ar Pab Martin V. E miz mezeven 1427 e
 voe anvet da arc'heskob e Tours. E Chinon edo, hep
 mar ebet, pa voe graet eun enklask war Janned ar
 evit gouzout hag a-berz Doue eo e teue da zavet le
 Bro.

E konsil Bal e tifennas gwirioù Duk Breiz a eneb
 Duk Bourgogn a glaske tremen en e raok. Anvet e
 voe da gardinal er bloaz 1440. Eur Montroulezad eo
 het hennez ivez hag a reas kalz enor d'e vro.

GALVADENN DA VREIZIZ

d'en em staga ouz e yez

Unieque patria sua carior est (1) dum supra omnia salivum fore queritur, ubi ab ipsis canabulis com- munitur.

Cassiodor Ep. 21, tom I, p. 21.

An den gouziek-man-ta en deus lavaret
Gant peb unan, e vro a diez karek.
Dreist kement tra 'zo, mui eget pep tra :

Eun den betek pa gemeras ar c'homzou-man d'ar gouziek bras,
Warneaz e-man, a-berz kalz tud, kalz a lorc'h a dennas,
O rei da gredi, dre em, en doa e-man derouet,

Ar pez en doa, koulzonde, diwar goust eus all heret (2).
Eur wirionez vras 'zo hag a red dre 'r bed,
Ar re goz o deus ato le lavaret :

Dreist eo an nep 'zo ganet e gwailh vro,
Rak klask a ra en em denna d'ez alto.
Ganto heb aoun e lavaran ive,
Breizad a die karek Breiz a greiz e ene :

Karet a die c'hoaz e yez, dreist pep tra
Ha lakat e holl boan mat d'he harpa.
Dre-ze plenn a gemer evit skriva,
Skoeza 'r brezoneg gourfrouzet da goueza :

Kalz tud zo hag a garfe hen douara,
Da Vreiziz kalonek eo dont d'hen harpa.

Pell dioc'h haout herberc'h ha skor etouez ar re he deus diorret
Ne gav etouez bugale he deus bet savet ha maget.
Nemet ieroun ha skaberien hastet bras d'he diwiska,
Ha da lammel digant kement he deus a gava.

Ma 'z eus c'hoaz e Breiz-Izel, hon Arvorik koz, bro dervek
Niver a gatoliked vat, e tleomp-se d'hor brezoneg,
(Hi 'so) he deus hor miret dioc'h fals kreolien ar C'hallaoued
Dioc'h stou fall an dud betek, dioc'h kentellou 'a hugmoued.

Hag evit gwir, ma 'z eus c'hoaz relijion en hon tenez
Ma 'z eus c'hoaz gwir feiz e Breiz omp dieorien e gwirionez
A gemer-se d'hor yez breizek, he deus [gallet] hor miret
Dioc'h pep fals kelennadurez ha douzomp o dibouet.

E pevar ugent ha trizek, dispac'h dizour he deus gallet
Diskar tiez Doue, kalz pennoù, hon ilizon d'erebel serret,
Lammel diganeomp, eur pennad, pep kelennadurez vat
Laza d'omp hor beleien, miret da brezeg d'omp ar mad.

Miret onzomp d'en em zastum evit pedi, sakramant,
Azeuli Doue, en templou, miret onzomp ubi d'e venli ;
Hogen 'vel ma 'nna ket breizek, n'e deus ket gallet lammel
Na feiz, na relijion, eus a douez ar gwir Vretoned.

Dre na c'helle ket an Dispac'h kentella e brezoneg,
Feiz ha relijion zo c'hommet gant ar re wir vreziek
Ha ma 'z eus kalz Vretoned diwar ar gwir gredenn rikket
Pennabeg eus an dre-se eo ma 'z int 'n em c'hriet Gallaoued.

Gant yez galleg o deus desket disprizout Doue, e Hir ;
Ober fae war gwir gredenn, koll o ene gand ar feiz ;
Kalg eo o levrioù o deus kavet tmoù hag a rak klaz.
Hag traou nozaus d'an eneez 'vel ma onnez 'zo dastumet
E kelennadurez, e skrijoù dizour ar C'hallaoued.

Traou ha ma talc'homp mat d'hor brezoneg, n'hellit beza
nozaus
D'hon eneez, d'ar gwir gredenn, hon eus en Hor Zalvez Jezuz.

Hor yez vrezonek evel hantell n'heller ket dreist tremen
A vro an denved, feiz, relijion dioc'h pep fals kreolien,
Ha dreist pep tra mar gellomp miret och ar yaouankizou
Da henta Gallaoued hag da lenn re o skrijoù.

Ar Brezoneg eta ne d'eo ket eur yez garo ha gouez
Evel ma klask rei da gredi kalz tud 'zo en hon tenez
Hogen eur yez eus ar c'hiera keroliek hag eus ar re gosa
A c'houliken [ouzoimp] hon azouez ha ma trespem ar skora.

Rak emm kenta hag e yez all ebet e kaver kalz skouerion,
Hag eus ar re binvidika a c'heller haout er gwella yezou ;
Pividik en he disklariadur, nerzus en he lavaran
Ne gavo'ch par ebet d'ho yez vreziek etouez an holl yezou.

Kement-se holl predirit, ne c'hellan ket re her lavarout
An holl Vreizad vat ha kalonek a die evit kaout
Ar brasa azouez, [hag ar] brasa karantez Jezuz
Ha lakat o holl skriv da skina dre holl he anaoudegez.

Dre abeg da gemer-se eo em eus graet ar skridig-man ;
Gand an joul da zibuna e kalonou an holl dud dreizan,
Kement a c'hoantegez da skora ha da harpa mat hor yez
Evel e pep kalon gristen d'her he silvidigez.

Panallomp eta va mignon lenner,
Ha gromp d'hor yez vreziek gwel pe well,
Hag o welet penaos he zaoler
Bemdez er fank, klampomp he sevel.

E kement-man holl, va c'hoant ha va joul brasa,
Eo lakat e kalon Breiziz da arveza
Evid o bro hag o yez kaer ar brasa orded
Ma vezo atao en o zouez kendalc'het
Rak he gwel komet ha skrivet mat en o zouez
A ra e peb amzer va brasa levezeg.

Dihunomp 'n en hor c'halonou, Bretoned,
Eus hor yez kaer breizek eus dra bennek a orded
Orded, a zo [sloanez], e kalz kalonou komet
Ha ma lavarfen mat, e kalz [loken eo] m'agret.

Guerz sauet er bloaz 1847 gant Y. AR MOAL, person Sant-
Martin Montroulez.

AN TEODOU BEO

E bloavezion diveza ar brezel bras, eun amezeg
d'in a gavas eur paotr yaouank seder, oc'h aveli e
benn, war aod Goull'han, gwisket evel soudardet
Amerik, a gouze brezoneg koulz hag eur breizad bet
ganet e Leon ha saoneg koulz hag eur saoz bet ganet
e London; ne ouie ger galleg ebet avat: « Me, emezan,
n'oun ket ginidik eus ar vro-man, met va zad a zo
eus a Dregaranteg; set e oa bet abred da c'houmit e
deus ket ankouta'haet e vrezoneg hag, en hon ti,
ni ne gomzomp nemet brezoneg. »

Goude beza meulet ar paotr yaouank-se da veza
chomet stag, evelde, dre ar yez, ouz Bro goz e Dadou,
va amezeg a c'houlenas aout pelra oa souezusa
traou en doa gwel e Breiz-Izel, ha setu amañ ar
reus kavet e Breiz eo gwel tud o vale gant boutiezer
koad, tiez savet gant mogerioù mein ha devezourion
o koll o aouez o chom edoug an deiz da derri mein
war an hentouh bras gand eur c'hoz morzolog hihan,
pa 'z eus henviaouion gouest da ober al labour-se kant
gwech dillooc'h ha kant gwech gwelloc'h marc'had!

Daoust pegen souezus e c'hell beza, sasunoc'h eo
kaout boutiezer koad, e Breiz, er goav, eget boutiezer
ler ha padusoc'h eo ivez hon tiez pa vezent graet
gant mein eget ne vijent bet ma vijent bet graet hep
gant gant koad, met a hend-all mag a wellaenou a
vije mat da zigas e Breiz ha na pebez ket war ar
garantek a dleer d'ar vro a ro mah Tregaranteg da
eleiz a dadou chomet e Breiz hag a gav amzere rei
d'o bugale eun deskadurez diazezet war ar brezoneg.

Penaos e tigasimp-ni biken gwellaenou e Breiz
keit ha ma vo ranket rei war goll ar pez a wezer, —
ha ne glevet ket 'ano, en deiz-all eus a 50 bouch bi-
han, prenet evit 50 lur ar pez, da laza, gand eur c'hi-
ger bennak eus a Vrest? — ha klask, daoust daze,
berniou archant da lakat e tailhou, evel ma raer
berman, da gas da Bariz, da vaga tud hag a zo o
pe, ar pez a zo gvasoc'h, da vaga tud hag a ra pep
tra, — evel ar skolaerien dizoue hag o devez, pa
vezent war ar mēz, betek 20.000 lur, — evel diskar daou
vaen diazez gwella hor Breiz: ar Feiz hag ar Bre-
zoneg!

Bretoned, mall eo d'omp digeri hon daoulagad hag
en em glevet, ar-arak ma vo re zivezat.
Gwellaenou a zo eozom da zigas er vro, met
n'eus hini ebet hag a vefe kement a eozom da zigas
e Breiz evel an hini a lakao ar Brezoneg er skolioù.
N'eus nemet eur bobl, en Europ, a gredan, ha ne
zeziket ket lenn ha skriva he yez er skolioù hag eo: ar
Vretoned.

Ma n'eo ket eur yez.

Pemp bloaz ha tregont a zo abaoe ma you'eomp
ar ger-ze e ar brezoneg er skolioù: eus an eil penn
d'egile da Vreiz ha pa 'z omp da gaoit pennadure-
zioù ar skolioù e vez lavaret d'omp: « Ya! ya! ar
gwir a zo diouz ho tu ha graet e vezo ouzoc'h ho lavar,
kenta ma c'hellimp! » Met gwellaenn ebet ne deu,
kaer a zo gortoz.

Komzou flour hag a va gand an avel ha netra ken.

Ha keit ha m'emaomp o c'hortoz ar wellaenn a

c'houlenomp e welomp en hor skolioù tud hag a
lavaret n'emaint enno nemed evid ober goap ac'ha-
momp pe evid ober gaoit ouzomp.
Dismezans a daolont, e pep doare, war ar brezoneg;
leshenvel a reont « Des Berlingots » — *mignoned Ber-
lin (?)* — ar re her c'hoaz; mez o deus o tougen
anoioù brezonek; Klevet a raen ano, n'eus ket pell,
eus an Aotrou Seac'h bennak hag a roe arz d'e vugale-
skol d'her gervel: Monsieur Séache hag evit diskouez
penaos hen ober d'an dudigou keiz a rank heul e
gentelioù e skrive, e lezao hag e ano Herve Seac'h,
e peder lizerenn: R. V. G. H. hag e lake e vugale, an
eil goude egile, da lenn ar peder lizerenn-se evit deski
kaer an doare nevez d'e henvil hiziviken.

Darn all a zo hag a lamm o stumm brezonek di-
gant anoioù brezoneka o bugale pe re al lec'hioù
n'emaint enno o chom: Floe'h, Peoc'h, Manac'h, Mar-
c'hadour a deu da veza Floque, Péoche, Manaque,
Marchadour; Pennmarch a deu da veza Painmarc'h hag
Aber-Ac'h, Aber-Vranque.
Sot da staga pe fallak an dud a ra traou evelde ha,
gwasa pez a zo, alies e weler tadou ha mammoù o rei
dourn d'ezo da gas gwelloc'h a-ze, en dro, o labour
villiget.

Hag evelato, daoust da dadou ha da vanmou a
da veza diskiant, daoust da vistri ha da vrezetred-skol
a zo, bet barlennet gwechall gant mammoù breizad,
da veza nac'herien ha nac'hered o bro, yez Breiz a
dregren eus an eil penn d'egile d'ar bed ha d'ar Heun-
Brug a zeñ Montroulez a vo eur mor a gan ha ne vo
klevet emañ nemet brezoneg ha ger kement hini a
denio di en deizioù-ze a vezo:
BREZONEG ER SKOLIOU

War « Y Dorian » an 30 a vezeven diveza e lennen
e kenraeg, ar pennad-man eus prezegenn Taldir d'ha
Breudher Tramor lennet gantian eus levr Limor: *Tar-
gu Bilhina, an Teodou beo*: « Klevet ho peus, m'ar-
vat ano eus ar burzud a c'hoarvezas gant sant Phil-
lip, unan eus Ebstel Jezuz; ar Juzevien o devoa hen
stlapet en ereou hag her c'hondaonet d'ar maro, dre
m'en devoa prezeget ar Feiz e Jezuz-Krist. Met kent
e laza e voe barnet da gaoit e deod diframmet. Ar
bourreo a deuas da ziframma teod ar zant, met setu
ar burzud evid ar Juzevien: daoust ma eo diframmet
e deod, sant Philip a gouze c'hoaz hag a brezege e
feiz e Jezuz-Krist hag e garantez evitan. Diou wech,
teir gwech e teuas ar bourreo da ziframma e deod
eus genou an Abostol, diou wech, teir gwech, teod an
Abostol kalonek a greskas hag a ganas meuldu an
Holl-C'hallaoued.

Setu eur skouer, dirak ho taoulagad eus netz yezou
ar Gelled; daoust n'emman ar C'hallaoued hag ar Zao-
zon o waska hor yez, hor yez a zo beo bepred! »
Kaeroc'h a zo, — rak enebourien an diavez n'int
netra e skoez enebourien an dinbarz, — daoust n'em-
man hor c'henvreze, bet savet gant tadou ha mam-
mou breizad eveldomp, o trouc'ha teodou breizek o
bugale, ar teodou breizek-ze ne varvint ket, ken
diaes ma 'zo treec'h gouenn; an teodou breizek ket
trouc'het er ger, bet trouc'het er skol, bet trouc'het
er c'hazarn, a nevez, a en em astemo hag a vezo
barrek da youc'hal adalek Lok-Maze Penn-ar-Bed,
tre betek Roazon hag an Naoned ha pelloc'h Breiz
da virviken!

Y. V. PERROT.

FEIZ⁽¹⁾

Fili sanctorum sumus.
Ni e zou bugalé er Sent.

MEM BRÉDER,

Bout e zou dré er bed broieu e zou karet get en Eutru Doue, muioc'h eged er broieu arall ha Breiz e zou unan ag (2) er broieu-sé. — En Eutru Doue en des diskoet é garanté drest pep tra é rein deli un trezol en des un talvedig'h hemb par: *Er Fé*. Rak ur vro a Fé, ur vro santel é hun bro-ni, get hé ilizien gouh, get hé broezien, get hé chapelieu e zou uzet enné er mein hag er patér get deuhlin er berhinderion; un doar santel é en hanl en des a houldé kant ha kant vlé poblet en Iliz a grechenion hag er barouziz a sent.

I. — Taolamb get devosion, get karanté, ur sel ar historé burhudus hun bro.

300 vlé e oc' trémet a houldé maru hun Salvér Jezus ar er mané Kalvar. — Er vro-man, e oc' groeit aneñ en Arvorig, e oc' bet feahet get soudarded Rom. Er loden brasen ag en dud e oc' lakeit d'er mari, er ré e oc' bet lausket geté ou buhé, e viú é er sklavaj; *Páinnéd e oent*.

Mes lostat é hra en amzér ma von rekiz d'er buanaj temein ardan dirak sklédér er guir Fé. — Er blé 288 é Nannéd, deu vrér iouank, Donasian ha Rogasian, en doé anduré er martir, hag eur misionér brudet, Sant Martin, en doé deja taulet, é doar en Arvor, haden santel er fé, haden er huirioné.

En amzér-sé, é Breih-Veur, e viú Kelted aral, bréder e Vretoned en Arvor. Ind eue en doé bet de vrezelát doh soudarded Rom, mes deit e oent de ben a hoarn ou frankiz, ou ieh hag ou *fé*. — me lar ou *fé*, rak grechenion e oent ha menahed santél e oa ou béleian. — A hoen men doé kuiteit er vro er soudarded a Rom, er Vretoned e hué é tonet, a audeu er Germani hag en Danemark, énebourion aral, tud kri ha digalon. Ha nivérus int el er stired ag en néan. — Er hué-men e ma rekiz plégin; mes aveit goarn ou frankiz hag ou fé, ind é ia de zivrocin. — Arlerh ou béleian, a vagadeu é tant de zoarein ér vro-men; él er hobl a Israel arlerh Moiz, chetu ind é tonet d'en Arvor ar'érh sant Paol, sant Brieg, sant Gweltas, sant Kado ar kant aral. — Labourer e hrant er vro e oc' hantval doh un dezerh, kreskein e hra ér parken er biéad, plijadur aveit en deulegad ha magadur aveit er horv. — Labourat e hrant drest pep tra é park en iménne, haden e hrant abarhi bliéin er *fé*, bliéin er *santelch* ha n'hé des chet arsáuet a greskein a houdevéh.

Krapamb er pazennou ag en historé; chetu en amzér diskonfort ag en dispeah bras. Dispeah émesk en dud, lahéréh, goéd ha daren. — Pen dé en dud santel gossket dré er fallanté; pen dé en ilizien dismantek, hé boéh e saoué eit dihinen er frankiz ag er huirioné? Boéh er Vretoned e hrei

(1) Prezegon graet gand an A. Brezorec, e Retred nr Bleun-Brug d'ar 14 a viz Gwergolo divrean.

(2) é Bro-Wenez, e lech. *raz* e leverer ag.

VA BRÉUDEUR,

Bezan ez eus dre ar bed broiou hag a zo karet gand an Aotrou Doue muioc'h eged ar broion all ha Breiz a zo unan eus ar broiou-ze. — An Aotrou Doue en deus diskoezet e garantez, dreist pep tra, o rei d'ezí eun tenzor en deus eun dalvoudégez hep par: *Ar Feiz*. Rak eur vro a Feiz, eur vro zantel eo hor bro-ni, gant hé ilizou koz, gant hé c'hroazioù, gant hé chapelieu a zo uzet enno ar vein hag ar pave gant daoulin ar hirc'hirined; eun doar santel eo an hini en deus ahaoc kant ha kant vlouz poblet an Iliz a gristenien hag ar baradoz a zent.

I. — Taolomp gant devosion, gant karantez, eur zell war-istor vuzrudus hor bro.

300 vlouz a oa tremenet abaoe maro hor Zalver Jezus war menez Kalvar. — Ar vro-man, a veze graet aneñ en Arvorig, a oa bet feahet gant soudarded Rom. Al lodenn vrasa eus an dud a voe lakeit d'ar maro, ar re a oa bet lausket ganto o buhez, a veze er sklavaj; paganed e oant.

Met lostat a ra an amzer ma vo red d'ar baganiez en em denna a-dreuz dirak sklédér ar wir Feiz. — Er bloaz 288, en Naoned, daou vrer yaouank, Donasian ha Rogasian, o doa gouzaveit ar verzerenli, hag eur misioner brudet, sant Martin, en doa deja taulet, e douran ar Vor, haden zantel ar Feiz, haden ar wirionez.

En amzer-ze, e Breiz-Veur, e veze Kelted all, breudeur da Gelted an Arvor. Int ivez o doa bet da vrezelkát ouz soudarded Rom, met deuet e oant a-benn da viret o frankiz, o yez hag o feiz. — me lavar o *Feiz*, rak kristenien e oant ha menezh santel a oa o beleien. A vech m'o doa kuiteit ar vro soudarded Rom, ar Vretoned a wel o tont, a aodou ar Germani hag an Danemark, enebourien all, tud kris ha digalon. Ha nivrus int evel stered an nenv. — Er wech-man eo red mat plega, met evit miret-o frankiz hag o feiz, int a ya da zivroa. — Warlerc'h o beleien, a vagadon e teout da zouara er vro-man, evel pobl Israél warlerc'h Moizez, setu int o tont d'an Arvor warlerc'h sant Paol, sant Brieg, sant Gweltas, sant Kadou ha kant all. Labourat a reont ar vro a oa henvel ouz eun dezerh, kreski a ra er parkou an costou, plijadur euid an daoulagad ha magadur euid ar c'horf. — Labourat a reont dreist pep tra e park an eno, hada a reont ebarz blien ar *feiz*, blien ar *santelch* ha n'o deus ket ehanet da greski a houdevez.

Pignomp pazennou an istor; setu amzer diskonfort an dispac'h bras. Dispac'h é mesk an dud, lazerezh, gwad ha daerou. — P'eman an dud santel, gwasket gand ar fallentez, p'eman an ilizien dismantré; pe vouez a zavo evit difenn ar frankiz hag ar wirionez? — Monez ar Vretoned a raio gand o divrec'h, gand o c'halon eur voger evit diarbenn ar fallentez. — Monez ar Vretoned a zavo evit lavaret d'an enebourien hep treuz: « Ma serrit hon ilizou, ni a bedo

get ou divrec'h, get ou halon ur vangoér aveit arret er fallanté. — Boéh er Vretoned e saoué aveit laret d'en énebourion hemb truhé: « Mar cherret hun ilizieu, ni e bedou dirak er groez saüet é blein en tour; mar diskaret er groez-sé, mar losket hun ilizieu, pedein e hrecmb atañ, ar hun deuhlin ar en doar; ni e bedou dirak er stired ag en néan. » — Er Vretoned ne blegant ket!

Ne oc' ket maru er Fé ar zoar en Arvor, ne oc' ket maru bliéin er santelch.

Ha chetu er brezél bras, er brezél skontus en des lakeit de ridek kement a zereu ha kement a hoéd. — Petra en des groeit a soudarded hun bro-ni er hetan soudarded a Frans? ou fé, ou santelch. Ind é ié d'en emgann er beden ar ou geneu hag ar en dachen, huaniet e oc' er Vretoned doh er medalenneu e zougent ar ou halon. — Ne oc' ket maru é Breih Izel bliéin er santelch.

Ne oc' ket maru ha padain e hra hoah, rak é monet a barréz da barrez, kavet em es hi é kement leh dré er vro.

Gwélet em es hi é kalon er vugalé distér disket é skolieu Jezus, stankoh en hur bro eit é broieu aral; Gwélet em es hi en hé béleian santél, en hé misionerion gredus;

Gwélet em es hi é iaouankiz, er bautred ha merched iouank, get ou dehorn ruet ha kalet marsé, get ou fas losket get en atiel mor, mes get ou halon divlam;

Gwélet em es hi é mameu a fameil, inour er vro, er mameu en des endro dehé ur gouronnen kaeroh evit er gouronnenne en des douget er rouané, er gouronnen ag ou bugalé.

Kavet em es hi é paured Breih Izel get ou fé iah el kalon en deru ag hun bro, soun el er garreg edan tauleu er mor kounaret. Kavet em es hi en Arvor hag en Argoed, é labourizion en doar hag é labourizion er mor; n'en des nameit ur gonz de reskond d'er ré e gareh ou distrocin doh ou *Fé* :

Ni zou atañ Bretoned,
Bretoned tud kalet.

Gourienet é er fé é kalon Breih-Izél, ha guir e lareh, o harh lan a zoustér, pe ganné houi poeh, unan ag re fé dousan e zou bet hiskoah kleuet ar zoar en Arvor:

Breizig-Izel e zou er vro fidel
N'hi dou hiskoah nameit er guir haniel,
Baniel hé Doué displeget drest hé fen;
Breizig-Izel e zou perpet krechen,
Breizig-Izel en des peur guskemant,
Ni des chet eur, n'hi des chet kalz argant,
Mes hi des Doué; n'en des gwelloc trezol.
En trezol-sé, hi er lak drest en ol.

Breizig-Izel e zou atañ krechen ha deli e hra chom krechen, rak ne veché ket mui er peh mé ma, bet hag er peh mé ma, en ur gir, ne veché ket mui Breih Izel en dé m'hé devehé ankoéheit seüel hé deulegad trema en éan, en dé m'en devehé kollet hé bugalé en trezol e zou éñ ou halon: *er Fé*.

II. Kavet em es broieu ma viú en dud enné é kreiz er largetanté abalamour d'er maden en doé lausket geté ou zud hoh. — E Breih Izel ne ha n'amb nameit er largetanté e hra d'emb labour

dirak ar groaz savet e lein an tour; ma fiskarit ar groaz-ze, ma loskit hon ilizou, pedi a raimp atao, war hon daoulin war an douar; ni a bedo dirak ar stered eun nenv. » Ar Vretoned ne blegant ket!

Ne oa ket maro ar Feiz war zouar en Arvor, ne oa ket maro bliemenn ar zantelezh.

Ha setu ar brezél bras, ar brezél spontus en deus lakeit da redek kement a zereu ha kement a hoéd. — Petra en deus graet eus soudarded hor bro-ni kenta soudarded ar Frans? O feiz, o santelch. Int a yea d'an emgann ar bedenn war o geneu ha war an dachenn, anavezet e veze ar Vretoned diouz ar medalenneu a zougent war o c'halon. — Ne oa ket maro é Breiz-Izel bliemenn ar zantelezh.

Ne oa ket maro ha padout a ra c'hoaz, rak o vont a barrez da barrez em es hi c'havet e kement lech a zo dre ar vro.

Gwélet em es hi é kalon ar vugalé zister desket e skolieu Jezus, stankoc'h en hor bro eget er broiou all.

Gwélet em es hi en hé beleien zantel, en hé misionerion gredus;

Gwélet em es hi er yaouankiz, er bautred ha merched yaouank, gand o fenn losket gand an avel mor, met gand o c'halon divlam;

Gwélet em es hi er mammoù a familh, enor ar vro, er mammoù o deus endro d'ezo eur gurunenn gaeroc'h eged ar c'hurunennou o deus douget ar rouanez, eur gurunennad bugale.

Kavet em es hi é paotred Breiz-Izel gand o feiz yac'h 'vel kalon an dero eus hor bro, soun evel ar garreg didan taouliou ar mor kounaret. Kavet em es hi en Arvor hag en Argoed, é labourerien an douar hag é labourerien ar mor; n'o deus named eur gonz da respont d'ar ré a garefo o distrei diouz o Feiz:

Ni zou bepred Bretoned,
Bretoned tud kalet.

Gwrizienet eo ar feiz e kalon Breiz-Izel ha gwir e lavarec'h, o harz leun a zouster, pa gane ho monez, unan eus ar re zouza a zo bet hiskoaz klevet war zouar en Arvor:

Breizig-Izel a zou ar vro fidel
N'he do hiskoaz nemed eur gwir banniel
Banniel hé Doue displeget dreist hé fen;
Breizig-Izel a zou bepred kristen,
Breizig-Izel hé deus paour gwiskamant
N'he deus ket ' aour, n'he deus ket kalz ' arc'hant,
Mes hi ' deus Doué; n'ez eus gwelloc'h tenzor.
An tenzor-ze her gra pinvidik-mor!

Breizig-Izel a zou atao kristen ha chom a die kristen rak ne veché ket mui ar pez m'eo bet hag ar pez m'eman; en eur ger, ne veché ket mui Breiz-Izel, en deiz m'hé defe ankounac'haet sevel hé daoulagad etreke tenzor a zo en o c'halon: *ar Fé*.

II. — Kavet em es broieu ma veve an dud enné e kreiz al largetanté abalamour d'ar madou o doa losket ganto o zud koz. — E Breiz-Izel ne anavezomp named al largetanté a ra d'omp labour hon divrec'h, ha koulsgonde eun tenzor kaer en deus lausket ganeomp hon tud koz: ar Feiz. — Ar Feiz... kavet hon eus hi en hor c'havel — kavet hon eus

hun divrêh, ha neoañ un trezol kaer en des lausket genemh hun tud koh: er Fé. — Er Fé... Kavet hun es hi en hur havel, — kavet hun es hi ar deuhlin hur mañ, e iliz hur bad'cent hag hur Pask ketan. — Kavet hun es hi e seuel hun deulegad aben d'er hlu, pen de guir: En néan stiredennus drest oh, Breñh, e splannein E lar e hes un Doué douh hou kalon, mes... mes laret d'hen, mé ma er pèh e teli hou: biv ha frèhus?

Er Fé, memb bred'er, e zou son en hou kalon, mes... mes laret d'hen, mé ma er pèh e teli hou: biv ha frèhus?

Er Fé, memb bred'er, e zou son en hou kalon, mes... mes laret d'hen, mé ma er pèh e teli hou: biv ha frèhus?

Hui e hanañ, memb Bred'er, er malloh e dautas Jezus un dé ar ur figezenn difrèh:

Hun Salvér beniget e héliç en hent e gas a Jérusalem d'er gerig a Vethani; tñem bras e oé en amzér, ha chetu deit hoant de Jezus de zèbrein. Ean e dosta d'ur figezenn e gresk'è en ur park, brañ e oé de huélet hé dél glas ha ledan displeget edan en hianù. Ne oé abañ frèchen erbet, ne ré namet dél. « E guirioné, emé Jezus, hamé ne damoi mui ag hou frèh. » Ahen en dé arlerh malloh hur Salvér en doé gret e labour, disèchet e oé er huéç en mat de vout talet èn tan.

Pegement a drud e zou hanval doh er figezenn-sé. Predég e bant get ou boéh, mes n'er groant bis-koah droz ou skuir. — Dél glas ha ledan... nitra kin.

Ind e lar ou des fé... mes hanval doh er soudard e gar baniel er vro, hag e dro kein pen de rekiz en dihuen, pe véhé rekiz seùel er vohç aveit dihuen drocdeit Doue, ne houiant mui namet plegem ou fen. — Dél glas ha ledan... nitra kin.

Ind e lar ou des fé... ha biñem e hrant el er ré ne hanañ ket lezennou Doué hag e iliz santel. — Dél glas ha ledan... nitra kin.

Er Fé, memb bred'er, e zeli lakat de bléçenn ne-pas hembin spred mah-den, mes eüé é volanté.

Doh er frèh e vé hanañet ur huéç. Hou Fé e zougou frèh — pe véet guélet liés ar ou teuhlin aveit er beden, pe véhet guélet é tostet liés d'er gadou e benijen aveit lakat reitied en hou kalon, ha de daut Vask aveit magem hous imam get er bara e za èn overen de vout korv hun Salvér.

Hou Fé e zougou frèh... pe lakéit poen de hoarn glan hou spred, hou korv hag hou kalon; pe lar-éet é guirioné a galon el a veg; Potius mori quam fèdari.

Hon Fé e zougou frèh... mar splann en hou obérou el en hou konzeu karanté Doué hag en nésan.

Hou Fé e zougou frèh... mar doh berpet gredus de seùel baniel er huirioné ènep d'er geñ, baniel er mad ènep d'er fallanté.

Hun Fé ha bi e zou biù? Hun houlenamb kement-sé edan sel en Eutru Doué. Mar hi des gouñ-ñem ènop, lakamb poen hini de hrein dehi un nech neté, ha nezé get Kalloh ni hellou laret:

O Fé men gourdadenn, goleüen beniget, Stiren em heulia ne vern émen é an P'é guir hou pes, beta hiriu, me ambrouget Lugernet ar me zal bet en eur deüehan!

Elsé re vou guélet.

hi war zaulin hor mamm, e iliz hor badiziant hag hor Pask kenta. — kavet hon eus hi o sevel hon daoulagad abenn d'al laez, pa 'z eo gwir:

Dreistoc'h, Breiz, o skeñ, an neuy steredennet A lar 'z eus eun Doue ouz ho karet.

Ar Feiz, va breudeur, a zo sonn en ho kalon, met... met livrit d'in, ha bez ez eo ar pez e tlefe bez: heo ha frouezus?

Ar feiz, heb an oberou a zo eur feiz maro; henvel e vefe ouz eur vammenn hep doug hag ouz eur wezenn hep frouez.

C'houi a anavez, va Breudeur, ar valloz a daolas Jezus, eun deiz, war ar figezenn difrouez:

Hor Zalver beniget a heulle en hent a gas a Jérusalem d'er gerig a Vethani; tomn bras e oa an amzer ha setu deit c'hoant da Jezus da zehri. Hen a dosta ouz eur figezenn a greske en eur park; brao e oa da welet; he deliou glas ha ledan displeget dindan an heul. Ne oa charz frouezenn ebet; ne roe nemet deliou: « E gwirionez, eme Jezus, hini ne danvo mui eus ho frouez. » Abenn an deiz war-lerc'h malloh hor Zalver en doa graet e labour; dis-ec'het e oa ar wezenn ha mat da veza taolet en tan. Pegement a dud a zo henvel ouz ar figezenn-sé. Prezeg a reont gant o mouez met n'her greont morse dre o skouer. — Deliou glas ha ledan... nitra kin.

Int a lavar o deus feiz... met henvel ouz ar zoudard a gar baniel ar vro hag a dro kein pa 'z eo red hen difenn, pa vefe red sevel ar voutz evit difenn gwirion Doue ne ouezont mui nemet plega o fenn. — Deliou glas ha ledan... nitra kin.

Int a lavar o deus feiz... ha beva a reont evel ar re ne anavezant ket lezennou Doue hag e iliz santel. — Deliou glas ha ledan... nitra kin.

Ar Feiz, va breudeur, a de lakat da blega n'eo ket hepen spred mah-den, met ivez e volantez. Diouz ar frouez e vez anavezet ar wezenn.

Ho Feiz a zougou frouez... pa vezoc'h gwelet alies war ho taoulin evid ar bedenn, pa vezoc'h gwelet o tostet alies ouz kador ar binijen evit lakat reizid en ho kalon, hag ouz an doal Fask evit maga hoc'h ene gant ar bara a zeu en oferenn da veza korf hor Zalver.

Ho Feiz a zougou frouez... pa lakeoc'h poan da vi-rel glan ho spred, ho korf hag ho kalon, pa leve-roc'h, e gwirionez, a galon evel a c'henou; Potius mori quam fèdari.

Ho Feiz a zougou frouez... ma splann en hoc'h oberou evel en ho komzou karantez Doue hag an nesa.

Ho Feiz a zougou frouez... Ma 'z oc'h hepred gredus da zavel baniel ar wirionez e enep d'ar gaou, baniel ar mad a enep d'ar fallentez.

Hor Feiz hag hi a zo heo? En em c'houlenomp kement-sé dindan sell an Aotrou Doue. Mar d'eo deuet da wannaat ènop, lakomp poan hini da rei t'èzi eun nerz nevez ha neuze gant Kalloch ni c'hello lavaret:

O Feiz va gourdadou, goulaouenn venniget, Steredenn am heul, ne vern pe lec'h ez an P'eo gwir ho peus, betek hizio, me ambrouget, Lugernet war va zal bete 'n eur divezann.

Evelse bezet graet.

HOR BREUDEUR TRAMOR HA NI

Abaoe eun nebet bloaveziou ez eus deuet kalz darempred etre Betoned Breiz-Vihan ha Bretoned Bro Gembre. An daou rumm a zo deuet d'en em anaout gwele-loc'h an eil egile, ha dreze d'en em garet muioc'h. War bouez enklask piz ar gziou koz, pe divar al leoriou, pe divar lavariou an dud, ez eus gwelet sklaer eun dres: Hon gziou koz ha re hor breudeur trasour a zo hevel-poc'h Kement-se n'eo ket souez, p'eo gwir hon eus ar menez gourdadou hag omp savet divar ar menez gwirzienn. Lennerien *Feiz ha Breiz* a diele marteze plijadur o welet displega unan bennak euz ar gziou-se hag euz ar « Sorbiennou » a ve kontet e Bro Gembre. Set' amma eur gennedenn hag am eus troet diwar leoriou saoznek.

« *Teir noz an Anaou.* »
D'an noz diveza a viz here, hanvet « Nos kalangou » d'an eur a hanter-noz, p'ou bennak a zello dre doull an alc'houez e diabas an iliz parrez, a welo teuzion kement hini a ile mont da anaou eus ar barrez dindan vloaz. Setu amma ar pez e c'hoarvezas gant eun den hag a zo beo c'hoaz, diouz a levetur.

Brema ez eus eun tregont vloaz bennak, ez oa miche-rouerion o labourat war iliz o farrez, er zizun diveza a viz here. D'an deiz diveza euz ar niz, eun sotrou a deuas da zellit ouz an traou koz a oa en iliz, hag en eur vont kuit, e roas dezo gwerz eur banne. Amzer lein a oa anezhi, ha darn anezha a viras o anezhant evit hen dispign diouz an noz. Unan anezha, e hano Leiz, a eus dreist ar pez en dije graet vad deza, ha vardro peder eur e tistroas d'e labour. Evel n'edo ket e stad da labourat, ar re all a lavaras dezenn mont da ober eur c'houek; heo dilunna a rajent, emezo, abars mont d'ar gêr. Leiz en em aspletas var eur skaan, ha dizale e kouezas kousket mik. Ar re all a gendalc'has da labourat. D'elloch, den ne zontas mui e Leiz, ha pa deuas ar pred da vont kuit, e lakajont o ostillon a gozvez, e prejont an or, hag e kasjont an alc'houeziou d'ar c'hoebler. Henann hervez e gustun, o lakaus en e arbèl. Ar vicherourion n'o deveze mui souz euz ar c'houeker, hag a fess, darn d'an ostairi da eva, ha darn all d'ar gêr.

Leiz en doa kousket c'houek bete vardro hanternoz, pa vee dilunnet, emezan, gant eun tourni spontus. Goude frota mat e zaoulagad, e welas edo e unan-penn, hag e kreiz an devaljeñn ar vras. Krenv oa, ha n'oa ma spon- tik na kredik. En em lakat a reas da glak almetez, a tro an tourbap. Edo rei an dro da vont e kostez an Aviel, pa gavas dezenn o dalc'het evel gant eun dra bennak a oa abas dezenn ha ne wete ket. Fallout a reas dezenn mont karkoc'h; hogen, rei e vee dezan dont var e giz betek al lec'h ma oa bet o kousket.

E keit amzer, an trouz a fea var gresk, hag e kave dezenn e klevet, hep e wete, eun interannant o lont euz an ordal da greiz an iliz. Epad eun netra-amzer hepen, e kreadas e welo eur c'hoer maro el lec'h n'edo ar c'hiz da lakat an arched keit ha ma veze ar person o lenn ar pedennou. Hen anaout a reas evit unan eus e amezien; hag evit ar wech kenta en e vuhze, Leiz a grogas souñ ennan. Spouront holl, ha koulz lavaret d'halanet e c'houez: « O va Doue, ho peret truz ouz va enet » Neure e tvas dezenn eun tammik nerz; hag ato e kreiz an trouz, en eur aslavaret e bedenn, e kerzas en eur zantourna betek an or, hag a gavas digor frank. Hag hen d'ar gêr, mar goude, Arak digouezont er gêr, ec'h en em gavas gantan tud, goulou ganto. An dud-se oa ar re o doa pignet an or varzeñn. Douet oa da zont dezo, hag edont o vont da zigeri dezenn, gant souñ na vije spountet pa zibuge. « Ha penaos, emezo, oc'h eus gelpountet pa zibuge? » Leiz a gontas ar pez a oa c'hoarvezet, ar re all avad ne gredent ket. Mont a rejont da c'houlenñ ouz ar c'hoebler ha digoret en doa an or, c'houlenñ ouz ar c'hoebler a deuas da lavaret d'ezo penaos he

fried a oa aet abred da gousket, abalanour m'ean doa pakat ar zifenn goude kaout rion. Leiz eta n'en doa bet sikour na digant ar c'hoebler, na digant den all; an alc'houeziou a oa bet lakat en arbèl, ha n'oa doa ket falc'het ac'hano; eno edont ato, hag e vout kavet gant ar vicherourion pa zistrojont d'o labour, da c'hwec'h eur. D'otrou an iliz, a oa pignet mat. Penaos ta neuze en doa gallet Leiz dont er neñ? Parc'h a rejont kement korn a oa e diabarz an iliz, evit klask eun toull bennak, hogen koll a rejont o foan hag o amzer.

Gouenn a rejont ouz Leiz doare ha stumm an den en doa gwelet, hag hep a lavras dezo eun den anavezet maer er barrez. Mad, dindan vloaz, heman a oa maro, hag e vefe gwelet e oa gwir ar pez a lavras an dud koz. Diskoaz avad den ne hellas gouzout penaos en doa gallet Leiz dont er miz eus an iliz en noz-se.

Setu amma eun istor all divarben ar memez tra, c'hoarvezet eun nebet bloaveziou varlerc'h egile.

Eun nebet plac'hed yaouank dispart a lakaus en o fenn gwelet ha gwir ou ar pez a lavaret divarben an teir nozvez. Hep lavaret ger da zeri, setu an denezell d'an iliz, goude beza roet o ger da ziskuih an eil d'eben, kement o dije gwelet, da vihana mar gwelet eun dra bennak. Pep hini d'he zro e seljont dre doull an ken na vout distro d'ar gêr. Sella a rejont hag e teujont sioul d'ar gêr. Neuze, unan a lavaras n'ho doa gwelet netra an holl an eil a lavaras he doa gwelet. He zad koz, an deiret a c'heme dilavar. Da benn an amzer, goude he fed kalz: « Me, emezi, am eus gwelet eur plac'h yaouank, gwisket e bouet, o vont varzu an aoter vras. Eno e tvas d'aveit eur gwaz, hag heman en eun toull kount, a gouezas maro e kichen an aoter. » Ar plac'h yaouank a oa deuet ker gweñn hag eun tamm paper, hag e lavaras: « Kredi a rafen oa me ar plac'h yaouank-se. »

« Bih! eme ar re-all, perak kredi diotachou evel-se? » An amzer a dremenas: diou eus ar plac'h yaouank, Kaus-koude eun deiz, hag hi pemp bloaz ha diaou-quent, e kavas ive eur vout diouh he zroad, hag unan vat. Eun devezion bennak arak he eured, e lavaras d'he diou vignon-vez, a oa o eun e kichen he zoi: « Ha sonj oc'h eus sonj mat; an dra-ze n'oa nemet diotachou evel-se? » An amzer a dremenas: diou eus ar plac'h yaouank, Kaus-koude eun deiz, hag hi pemp bloaz ha diaou-quent, e kavas ive eur vout diouh he zroad, hag unan vat. Eun devezion bennak arak he eured, e lavaras d'he diou vignon-vez, a oa o eun e kichen he zoi: « Ha sonj oc'h eus sonj mat; an dra-ze n'oa nemet diotachou evel-se? » An amzer a dremenas: diou eus ar plac'h yaouank, Kaus-koude eun deiz, hag hi pemp bloaz ha diaou-quent, e kavas ive eur vout diouh he zroad, hag unan vat. Eun devezion bennak arak he eured, e lavaras d'he diou vignon-vez, a oa o eun e kichen he zoi: « Ha sonj oc'h eus sonj mat; an dra-ze n'oa nemet diotachou evel-se? »

N Anna

An Anna a oa eur vaonez koz divar ar meaz. Ar brud he doa da veza piz ha da gaoz kas ouz ar wazed. Eun nizez dezi a oa mater gant; hano houma oa Mac'hariid. An hini goz a oue tost da vat he doa Mac'hariid ar *bon amz*. Eun devez ez eas diouz ar gear, ha Mac'hariid a zontje dezi ou aet d'ar mare-bad. Hogen, epad m'edo an nizez er gegin o lenn, ha c'houeza a stok e gorr. Ar plac'h nevez hag ar re all a glaskas dioc'h rei sikour d'ezan. Poan gallet: maro oa!

rig ruz a bignas david Donal. « Asa, Donal, emezan, petra fell deoc'h ? Pe seurt droug a zo c'hoarvezet ganeoc'h adarre ? » — « Ah ! eme Zonal, me 'm bezo buhez kement hini zo ac'hanoc'h, ha na chomo ket diou daman ac'hanoc'h stag an eil oad egile, evit an dro ho peuz c'hoariet din. » Hag hen displega petra a oa tremenet, ha rei da enent penaos an douziet en doa bet diganto na dalic ket hirroc'h eget ar maillard. An denig ruz a c'houlenas outa ha c'houmet oa bet en eun tu bennak en eur vont ac'hano d'ar ger en diou nozvez diaraok. » N'oun c'houmet e nell lec'h, eme Zonal, nemet en eun ti a zoare e skoaz an hent, hag eno em eus lojet. » — « O, eme an denig rus, gortozit eun tammik; me va da welet petra eun nebeut e teus var laez, ha gant eun tamm zac'h eun bennak, emezan eun dra bennak hag a ray vad deoc'h. » Bep wech ma lakeot heman war an douar en eur lavaret: « Bisac'hig, bisac'hig, grit ho teverig, » e ti-lampo e met anezan dek den bihan, ganto peb a beñ baz, ha netra n'helo herzel outo. » — « Setu eun dra gae avad, eme Zonal; gwelomp 'la petra eo. » Hag hen lakat ar zac'hig, var al leton en e gichen, en eur lavaret: « Bisac'hig, bisac'hig, grit ho teverig, » ha kerkent setu dek tammik en gant, peb a vaz spenn; hag o sevel, o bisier azioch o fem, e sellent a bep tu o klask war biou koueza. Donal o lakeas en dro er zac'h, en eur lavaret: « Set' ana avad eun dra eton. Hogen dek tamm denig bihan gant peb a vaz spenn a zo nebeut a-walc'h a dra evit tenna paourentez diwar Sally ha me. Ker paour omp n'hon deuz netra da zibri; ha penaos e fell deoc'h hon defe peadra pa hon devezo eun arme a rek den, d'ho voueta ? » — « En ti ma z o'c'h bet o foja en diou nozvez, eme an denig rus, an ostiz hag an ostizez o deus laeret deoc'h ar maillard glaz hag an douziet, hag o deus lakat en o lec'h re all henvel outo. Kemerit ar zac'hig man, hag it d'an ti-ze. Goulenit ho touzier hag ho maillard. Ne falvez ket dezo o rei deoc'h. Lakit neuze ho sac'hig war leun an ti, ha livrit: « Bisac'hig, bisac'hig, grit ho teverig, » ha me a lavar deoc'h ho pezo dizale ho maillard hag ho touzier. It ganto var eun d'ar ger da gound Sally. Biken mui n'ho pezo dienez nag a voued, nag a aour; hag ompen ze ho pezo eun arme a rek den, d'ho tiouall ket ha ma vevo'c'h. » — « Mad sur, eme Zonal; eun dra gae eo kement-se, sur a-walc'h, ac'han hag alec'hoat. » Hag hen, trugarekaat an denig rus, ha d'ar ger, mar goude.

Digouezad a reas en ostalliri, e skoaz an hent; hag e c'houlenas da goania ha da loja. Digemer mad a gavas, hag e lavarjot dezan hen dije an eil hag egile a galon vad. Goude koania mad, hag arnake mont da gousket, Donal a roas ar zac'hig d'an ostizez en eur gemenn dezi hen diwall mad: « Dreist peb tra, emeza, ha dindan boan a waro, arabat deoc'h lavaret dezaz: Bisac'hig, bisac'hig, grit ho teverig. » — « O netra avad, eme an ostizez, n'her graimp ket, sur; perak her graimp ? »

Ket Donal d'e wele, an ostizez a grogas debron enni adarre; hag en eur drei ha distrei ar zac'hig: « Eme eston eo, emezi, en defe lavaret deomp diwall na lavar-femp: « Bisac'hig, bisac'hig, grit ho teverig. C'hoant an eus da welet. » Hag hi lakat ar zac'hig var leun en ti, ha lavaret:

« Bisac'hig, bisac'hig, grit ho teverig. » N'oa ket peurlavaret ganti, ha setu dek denig bihan, gant peb a vaz spenn, o trei azioch he fem; ha dao, ha skei en tussa kallet ha skei ha lopa war gemenn hini a oa en ti, dreist holl var an ostizez, hag ober dezo lamet, ha korolla, ha chilgammat, ha gopal, ha yudal, dre an ti hag endro d'an ti, en diabarz hag en dianvez. Donal a glev e un tounn, hag a c'hoarvez da ranna e galon. Pignat a rejot d'e gamp, hag e c'houlenjot outan gervel e dud, nemet c'hoant en dije e vije brostet ha lazet an holl. » O nann da, eme Zonal, ken n'ho pezo digaset aman va zouziet-me ha va maillard glaz. » — « Aiou, Ai, Ai ! ar pez a

geroc'h a ramp, gant ma c'halvoc'h an dek den spontus-ma hag o deus c'hoant da lemmel hon eneo diouz hor c'horfou. » Buan-buan e voe digaset da Zonal e bouadik glaz hag e douziet. Donal avad a c'hedas m'o dije tanvaet mad fest ar vaz. Neuze e c'halvas e zoudarded, hag o lakeas er zac'hig, hag hen d'ar ger gant e holl draou.

Pa en em gavas er ger, antronoz vintin, Sally a deus d'e ziambr. « En dro-ma, en tall, emezi, ho peus digaset peadra d'hon tenna hon daou a bourentez. » — « O ya, avad, eme Zonal, deuet ez eus ganeu traou souezus, ha birviken mui n'hor beta dienez a netra. »

« Petra zo ganeoc'h 'la ? » eme Zally.

« N'her livirin ket deoc'h, eme Zonal, ken n'ho pezo gant en amezien da welet petra eo. »

Hep dale eto an oile e ti Zonal, o farsal hag o c'hoarzin, war c'hed ma trofe an abaden e'ch'is an diou wech all.

Pa voe en eun zastumet an holl en ti, Donal a lakeas al labous en eun neiz var an daol, hag a lavaras: « Maillard glaz, maillard glaz ! » An holl a zispourbelle o daouad-gad, hag e bellit kredi o digorjont frankoc'h c'hoaz, pa weljont ar vi aour ker koant, ker flour, ker lintrus graet gant ar maillard.

« Estonet o'c'h eme Zonal: an dra-ze n'eo netra e skoaz ar pez a walc'h brema zouden. » Hag hen tenna al labous divar an daol, ha leda an douziet, en eur lavaret: « Touziet, touziet, servic'hit a bep seurt. » Kerkent, setu an daol goloet a bep seurt traou da zibri ha da eva, a-walc'h evit er c'hanat a dud. An amezien a reas eul lipse-bao ar seurt n'o doa graet biskoaz en o buhez.

Pa o doe an holl dehet hag evel eiz o c'hoaf, Donal a lavaras. « Al lodenn gaera am eus c'hoaz da ziskouez deoc'h. » Hag hen lakat ar zac'hig war leun an ti, en eur lavaret: « Bisac'hig, bisac'hig, grit ho teverig. » Ha kerkent, setu dek denig bihan, ganto peb a vaz spenn; ha dao war an amezien. Skei a reant a gleiz, a zehou, e kreiz, a bep tu. An amezien a c'harne, a yude, a lamme, a dourlamme, a gorolle e peb korn eus an ti ha wardro an ti. Donal a oa en e zav e tal an tan, e zaouarn gantan adre e gein, o sellet hag o c'hoarzin a greiz kalon, epad m'edo ar re all o pedi amezan da c'hervele e dud. Donal, avad, ne felle ket dezan o gervel ken n'o dije bet an amezien ar pez a oa distet dezo, ar wasa roudenn o doa bet en o buhez; a vech ma chome eun askourm en e bez en o c'hoaf. Neuze, dre urz Donal, an dek denik a gassa an amezien e mez eus an ti, hag a teas endro er bisac'hig.

Ha Sally, emet-hu? Epad ket amzer, Sally a oa azezet en eur c'hougn, hag a zelle out ar c'hoari, mandret holl. « Bete vremen, Sully, eme Zonal n'eo ket flour a-walc'h an tamm ac'hanoc'h; me gred al louzu-ma a raf vad deoc'h ive. Bisac'hig bihan er meiz ha dao war Sally, ha skei, ha lopa, ha lorgna, dre ar gegin, dre an ti, ha tro var dro, Sally a bele Donal da zont d'he difenn ha da zastum e dud. Donal a oa ato en e zav tal an tan, e zaouarn adre e gein, hag a c'hoarvez, a c'hoarvez da frailha e galon. Gortoz a reas ken n'he doe Sally gwalc'het mad he lioz; ha neuze e c'halvas e dudigou hag o lakeas er zac'h. » Sally, emezan, kridi a ran en dezo graet al louzou-ma kalz vad deoc'h. » Ha graet en doa, rak hivizien e taolas euz na gollje mui he fiasanted gant Donal.

Donal, gant ar viou aour, a lakeas sevel eur maner bras, hag a oa varnezan ken alies a brenez hag a zeiz a zo er bloaz. Eno e roe leinon bras ha festou ha n'o doe biskoaz o far, nag er vro-ze nag er vro-ma. Nen deus ken roue nemetan an eun, Eur arme a rek den a voe en e zervic'hit ha ma vevas, Sally a voe er wreg sentus ha seder bed ar rest euz he buhez; ha mar d'oa eun den gwividik er bed-man, Donal oa an den-ze.

Troet euz ar Zouezeg gant,
YANN KOSTARREUN.



LOK-RONAN



Iliz Lok-Ronan ()

Pa gemerent hent koz Kemper da Vrest, eur wech tremenet bouc'h Plogonneg ha graet eur zell euz he iliz kaer hag he zour, eur gurunennad touribel-lou en dro d'ezan, e lec'h kemeret an hent nevez a ra an dro d'ar menez, eo gwelloc'h kemeret an hent koz, glasvezet ha goloet a vein rodell, a bign, dre al lanier hag ar gwaremou. Eur wech digouezet war gern ar menez e kav ar balcer eur gwel dispar dirazan.

An A. chaloni Abgrall, gwechall, a gure kas di an dremenidi a dese d'e wele, evit kaout ar biljard d'o c'hevet o'c'h ober meulenti an daolenn gae a gvent dirak o daoulagad: ouz traon ar menez eman ar vouc'h. — ker Lokronan, gwechall. — Tri dour he iliz vras savet souenn, er vann, azioch he ziez koz; en tu dehou, ar menez gand e lanier eur, matrellet gand bleun ar balan hag ar brug; en tu kleiz setu Plounevez-Porzay ha Kertaz gand o meziou graiz-kaol ha mor Douarnenez, ken dudius en hant, gouzizet gand briou Telgrug ha Kraouen, Dirazomp, setu ar menez Du ha leir dorgenn glas-rus Mene-Hom. Eno eman, sur a-walc'h, braoa tiou-lagad a zo e Breiz-Izel.

Ar menez-ze, gwechall goz, a oa penn-da-benn dindan goad: Koad an Duk ha Koad Neved eo an tammou a jom c'hoaz eus ar c'hoaz koz; eno eo e'c'h en em dennas, er VI^{me} kantved, sant Ronan, eur manach eus a Iwerzou, evid ober pinijenn. Graet en devoe e ziskenn war aochou Leon ha chomet e oa bet eur pennad el lec'h m'eman breman ker Lok-Ronan-ar-Fank (Lokronan), met re a dud a dese d'e gant hag e te'chas da vro Gernez eno ne voe ket le-vaonez amvet Reben a lavaras a bep seurt traou anezan; Ronan, gant gras Doue, a c'hellas diskouez skler d'an holl pebez teod fall oa an hini hen tamalle, met

skuitz gand an trabas-ze a glasked outan e te'chas diouz koajou Kerne hag ez eas da dremen e vloaveziou diveza da Hillion, e kostezioz Sant-Brieg, Goude e varo e voe lakat e gorf eun eur c'harr stlejet gand ejnede a voe lezet da vont e lec'h ma karent. Ar reman a geras epad meur a zervez, muioc'h-mui a dud ouz o heul, demdez, hag a jomas a zav e bro ar Porzay el lec'h m'oa bet ar zant o chom gwechall hag a gare dreist holl lec'hioz all Breiz. Amat eo en devoe c'hoant da ober eno e ziskuitz diveza. Eur bez a voe toulllet evitan ha war e vez e voe savet eun iliz kaer.

Er bloaz 1031, Alan Canhiart, tiern Kerne, e brezel ouz Alan III, Duk Breiz, a welas tud nemetan o vale warzu Lok-Ronan. Kuzet e Koad Neved, e klasket an tu da goneza war e enebour. Pa welas en doa kaset e dud, a gleiz hag a zehou, da laerez, er vro binvidik-se, ar pez a oa diouz o doare, e roas urz d'e varc'heien da zailha war al laeron. Breiz-Uheliz ar re amezo ne vont ket lazet a dechas buana ma c'hell-jont hag an tiern Alan, evid seveni al le en devoe graet ma chomje ar gound gantan, a zavas da zant Ronan eun iliz kaeroc'h c'hoaz ebed ar genta hag a stagas outi leveou bras.

An iliz-ze, hag a oa petc'hennet gand menezc'h abati Kemperle, a zo bet savet unan nevez en he lec'h, e bloaveziou diveza ar XV^{me} kantved; an hini a rene al labourerien, er bloaz 1485, a oa eur breizad, Per ar Goarager, an hini a lakeas ober an tu, eus a iliz-veur Kemper, a zo troet ouz an haoter-noz. Azioch en iliz-ze e oa gwechall eun tour uhel, nemet, gwasa pez a zo, eo bet diskaret e veg gand ar gurun.

Dindan an tour eman an nor dal, kement a hed hag a lehed ganti, diri mein da bignat enni. En tu dehou eman dor chapel ar penit, el lec'h ma viret c'hoaz bez sant Ronan; azioch ar chapel-ze ez eus

eur tour ker moan ha m'eo leo an tour bras, e amezeg; eun trede tour a zo a-c'haolind, war an doorn a tispartia ar c'heur diouz hali greiz an iliz. An ilizez, gant he mogerion dantelezez ha goloet a givri alouret hag ar'hanlet a zo graet diouz ar gerig vihan a zo he ziez koz c'hoaz en o sav, en dro d'he leur-gér. Eno e oa finy ha puvridigez gwechall pa oa leun ar voure'h a wiaderien oc'h ober lien bagou. Aet eo ar c'henwez-se d'an traon, evel cleiz a draou all e Breiz abaoe m'eman ar C'hallaoued enni oc'h ober o mistri, hag e liz ar wiaderien pinvidik a-wechall ne gaver mui, kouz lavaret, nemet peorien.

Greomp eun dro d'an iliz hag en eur vont enni dre an nordal, taolomp eur zell war he alc'houez, eur skoued herminiget warnan Diabarz an iliz a zo tenval ha leiz; eun dervez ma 'z is charz, endra ma oa tomm d'in e rankis raklal dont er miz da c'hortoz va 'houezenn da dremen, rag edon o vont da veza skournet dioc'htu; gellet em dije paka va fall. Plijeri leo a zalc'h en o sav an tour hag ar lozou. War ar prenestr bras eman diskleriet ar Bastion e triouec'h taolenn. E traon ar verenn vras-ze eman Aotrou Neved, war vare'h, gwisket gant dilhad houarn, eur banniel en e zour, e armou warnan, eul leopard rus war eul leurenn alaouret, hag e c'her: *Perak?* Aotrouned Neved, a oa o c'hastell, n'eus netra ebet anezan ken, en e zav, — war harzou Plogoneg; ker



Plas-ker Lok-Ronan

ned Neved, ar Yeu'h, Tresseol, ar Genkiz-Portay, Lezarscoet, hag ar C'hoz-Kastell, da lavaret eo armou tud-ehentil vras ar Porzay, en amzer-ze.

Divez eur zell a zo er gador brezeg, warni huhez sant Ronan, e Sant-Mikael, pouez ar eneo, e Jezuz



Iliz Lok-Ronan

bras oa a lavare ar re goz, ma a labour a-walc'h da eun den, edoug an deiz, o serra hag o figeri e brenecher. Aotrouned Neved a roe kalz da Iliz Lok-Ronan hag o lez, e marb du, a welet e kreiz ar c'heur. Ar bezze, na petra 'ta, a voe dismantret gant Dispa-c'herien 1793; an tammou-skrid anezan a zo bet gellet o savelet a zo breman speget ouz moger an iliz hag aez eo gwelet ditonto e varve yaouank holl aotrouned Neved. Unan anezo, Roman Neved, a varvas er bloaz 1676, a-raok e dregont vloaz ha kement



Or-dal Lok-Ronan

diskennet eus ar groaz, en *Ecce Homo* hag e Sant-Roch, bet graet er bloaz 1509.

Pardon bras sant Roman, d'an eil sul a viz gouere, a zo brudet abalamour d'an Drovvenhy (*Drovenni*), e vez 10 pe 12 000 den bep c'houec'h vloaz ouz hen ober. An dra-ze eo an hini a rae gwechall ar zant, e-unan, war yun, eur wech er zizun, hag he devoa ter leo hirder. An Drovvenhy eo devozion vras ar Gerneviz. An neb n'her graio ket-ze-vo, a leverer, a ranko hen ober, goude e varo, ha ne gerzo bep bloaz nemet hed e arched.

Ar prosession a die mont er mez, ne vern peger fall e vefe an amzer. Er bloavez e rae dour-bil hag ar velien a lavare ne 'z aied ket er mez, met da eur ar prosession, darn ha ne veled ket a groas e kerdin ar c'hleier hag o lakeas e brall; an nor-dal a zigoras ha tud koz ha n'ont ket anavezet, a groas er pannie-lou, er c'houzou, hag er relegeier hag a ganas gwerz ar zant.

Ar c'hoummoul a deuas d'en em zispenna ha gwelet e voe dreizan, anavezet, an sabl glas. An dud, straffulhet, a boullas ar prosession; ar zent koz eo a oa deuet da ober mez d'o bugale vihan ha da rei d'ezo eur gentel; abaoe biskoaz n'eo bet chomet an Drovvenhy hep beza graet, zoken epad amzer fall an Dispa-c'h. Er prosession-ze e vez douget kloc'h sant Ronan, deuet gantan eus a lwerzon evit gervel ar gristenien hag a lake da dalvezout da zigeri hent d'ezan er c'hoajou, rak a-walc'h e oa d'ezan her seni evit lakat an drez hag ar strouez d'en em deurel darvu diouz eun tu ha daru diouz an tu all.

Ar prosession a ziskenn da genta betek chapel I. V, ar Chelou mat, e traon ar voure'h, ac'hano ez a da Drehabu, d'ar Gernevez el lec'h ma torras Kebeu, gant he golvaz, unan eus kerniel an ejen a oa startet ouz ar c'harr edo eman relegou ar zant o lont en dro d'he lenit; her strinka a eure eun hanter leo ac'hano, el lec'h hanvet *Plas-ar-Chorn*. An torfed-ze a voe he zorfed diveza, rak en dra ma rede war-lerc'h ar c'horf, ar mallozou o lont eus he genou, an dotar a zigoras hag hel lonkas ez vev; lear ar souffr a jomas war he lere'h.

E traon ar menez, a-raok staga gant pennad diensa an dro, e kaner ar *Parce Domine* ha neuze e stager da bignat ar menez ouz son ar c'hlerioned hag an taboulinou. Pôlred ar bannielou a vez harpet gant o mignoned dindan o c'haoulou. — War gerr ar menez ez eus eur chapel, digor d'ar peier avel, da

zisehlavi skeudenn sant Ronan; ac'hano e vez prezeget — eur gwir brezegenn war ar menez, hounnez ivez, — ha pa vez diskuzet eun tammig an dud, ha faolet eur zell war ar vro gae a weler ac'hano tro-war-dro, e tiskenner warnu Plogoneg, e tremener ebet ouz *guez c'hlas*, ha bez Kebeu-merket gant eur groaz koz ha ne vez ket saludet, hag eur wech treuzet lammeier Gorrekêr, oc'h en em gaver en dizro, er voure'h, evit kana an Te Deum e chapel ar Peniti.



Bez Sant Ronan

Eliz ha pe c'hellont ket kemeret peuz er prosession vras-ze a ra an dro o-tinan, en deiz, pe zoken en noz. War a lavar ar re goz ne c'heller ket en em goll rak pa ne ouezer mui pelec'h mont, e kreiz an denvaljenn e weler, evel eun den gwenn, o kerzet er wenojenn hag a vez kel lugernus e roudou ma n'oar ket evit fizia ken. Ne leverer ger, keit ha ma vezer oc'h ober an dro, nemet pedennou.

En iliz, an dud klanv gant ar remm a dremen dre zindan maen-bez ar zant hag a bok d'e benn evit hen digoll diouz an dismegans en devoa c'hoant Kebeu da ober d'ezan. Meur a hini avat goude beza poket da benn ar zant a dufe war al leon a zo ouz e dreid dre ma welent eun skeudenn an hini drouk, ar pe-c'her a stourm ouz Doue, en eur ger skeudenn Ke-beu.

Ar pez a laka an Drovvenhy da veza kaer, ouspenn al lec'h ha dilhajoù koant Kerneviz, eo ar chapelion savet hed-a-hed an hent, eun tregont bennak anezo. Holl zent ar chapelion diwardro a deo da zaldit ar c'henta anezo deuet er vro. Lokigou a vez savet d'o digemeret hag eur c'hester a jom e kichen pep hini a ra meulendi ar zant hag a ro e relegou da bokat. Knout a rae evelse, sant Even, eus a Gemeneven, sant Thelaz, sant Albin, sant Thegoung hag elez a re all. Ar c'hester e faolas Pol de Courey, pa reas e Drovvenhy, er bloaz 1860, ar muia evez warnezan oa kester sant Urloù a youc'he bep pouez en eur zent e gloch hag en eur rei d'ar re a dremene dour hag e oa bet soulet ennan relegou e zant: *Sant Urloù a bare diouz an derzien ha diouz an holl glomeje; tostald ouz e relegou ha kemeret e zour santel.*

G. P.



MIKAEL AN NOBLETZ

1577-1652

Poaniou diveza

Evel pa n'en dije ket c'hoaz grêt awalc'h evit Doue, Mikael an Nobletz a gredas gouenn digand Hor Zalver kaout perz en e bonniau. Selaouet e voe e bedenn, hag eun deiz e lavaras da Janned ar Gall deuet da gempenn e di : « N'am dilezet ket, emezan; a-raok tri bloaz ne a vezo seizet, hag ho pezo kalz poan ganen. Dale'hit koun oc'h bet roet d'in gant Doue, ha ma leuit d'an dilezet, e kouezo varnoe'h malloz Doue. » — « Piou en deus lavaret d'oc'h ho pezo em hevelpe klenned ? » — « Ar Spered Santel. » A-raok n'a c'hoarvezas gantan beza seizet, c'annet a-Gall a skizas gantan, hag eun deiz e kuitas he mestri, en eur lavaret ne zistrofe mui.

Mikael a c'houznavas pep tra heb en em glenn, heb ober rebech ebet da Janned ar Gall. He difenn a reas eneb ar re a wall-gomze anezi. Peñt a reas eviti, hag a-benn eur pennad Janned a zistroas ha ne zilezas mui he mestri.

O velet e tosta ar maro d'ezan, Mikael a reas e c'houc'hennennou diveza da dud Douarnenez : « Ra vo ato en ho touez, emezan, unan bennak da lenn d'oc'h va skridou ha va c'hentellou. Roit deskadurez kristen d'ho pagale, o likit etre daouarn mistri kristen. Bezit leun a zoupans evit ar veteien, sentit ouz ar c'hentellou a roio d'oc'h ar c'habusinet hag ar Jezuited. Grit allennou da zikour an Iliz hag ar relijion. Bezit ato unanet etrezoc'h dre lianour ar garantez. »

Dre destament ive e lezas gant Douarnenez e daolennou teul lodenn en doa roet ive d'an Tad Mener, hag e verke sklêr penaos ober evit o dudall hag etre daouarn piou o lakat.

Gand e gerent e lezas eur vovestig hag enni netra. Gwelloc'h eget arc'hant a lezas gant : kenneleiou fur dre skrid : « An aour, an arc'hant ha madout ar bed a zo brasa enebourion hor zilveridigez. Abalamour daz-e e lezan gameoc'h netra. »

Evelato, pedit evidon, hag eus va zu me a bedo evidoc'h. »

Mikael an Nobletz seizet

Wardro gouel sant Mikael, 29 gwengolo 1651, Mikael a voe seizet, d'ar mare m'en doa lavaret. Epad seiz miz penn da henn e chomas evelse, hep tamn nerz, hevel ouz eur bugel bihan a ranker da gas ha da zigas. Pell zo eto e stad vat da vervel. Met ar c'hennved diveza e lakeas c'hoaz e stad welloc'h o rei tro d'ezan da c'houznavas ha da c'houit benned evid ar Baradoz. Lakat a reas skrida da Gempenn da eun Tad Jezuit evit goullenn beza erbedet ouz sant Korantin, patron Kerne, rak ezom en doa da veza kennezet gant Doue.

War e wile e kendalc'has da labourat gwella ma c'helle evit silvidigez an enoc'h e gerent, e vignoned, ar re a veze kovez gantan, ha dreist-holl ar beorien a zeue d'e wile ha die glevet, hag e roe d'ezan e gentellou. Ar vugale vihan a gendalc'he d'en em voda endro d'ezan evit deki o c'hatikiz, hag eun dra gaer meurbet oa gwelad ar beleg koz, seizet, o kelenn eus e wile ar vugale vihan.

Unan eus e amzeien ha mignoned, Markiz Kergrader, en deves troez ouz Mikael, o wilete peger paour oa e gamb. N'oa enni nemet eur bank da azeza, ennan pape-riou ar misioner, eun trebez bihan, eur pod pri, eur skredell, eun asied hag eun loa breñn, diou skedenn, var unan an Dreinded, war eben ar Werc'hez, hag eur pinsin evid an douz benniget. Ar c'hlanour a oa astennet var eur gwelad striz, gand eur palenn hepken. Ar markiz a ginigas d'ezan e zigemeret en e vaner. Mikael, en eur vour-

c'hoarzin, a lavaras : « Pegement a rofe'h d'in evit troka ? » Ha da c'houde, gand eur voutez start : « Dale'hit ho maner evidoc'h, ha goullkoude tostât a ra an deiz ma karfe'h troka ho maner ouz va zi paour. » Hag e gwirionez ar markiz a varvas nebeut amzer goude.

Da fin ar c'hoarzin 1652, epad amzer ar Bassion, ar c'hlanour, o sonjal e poaniou e Vestr, a c'houllennas beza bour-revet eveladan. Selaouet e voe e bedenn. An drouk-spered en em lakeas gantan hag e vourveas en eun doare kriz, e skourjezas, a glaskas toulla d'ezan e dreid hag e zaouran gant tachou bras : ar merkou a oa c'hoaz anet goude e varo. Tenna a reas digantan e zillhad, hag o zarle er fank. Met kaer en doa Salan, ne deue ket a-benn eus ar mistoner a lakae e fuzians e Doue hag a ra goap eus an enebour.

Mikael a voe frealzet e kreiz e boullou gand an Tad Kintin, en em ziskouezas d'ezan skedus holl. Ar gwelze a reas d'ezan da gompren e tosta e deiz e varo. Hag e c'houllennas e zakramanchou diveza.

Ar zakramanchou diveza

Diou vech ar zizun e kommunie abaoe m'oa klav. En drouk-spered en em breparas gwelloc'h c'hoaz evid ar gomunion a veze marteze an diveza. Leun oa e di a dud. Pa glevas kloc'h ar gomunion, e klaskas mont d'an daoulin. Adori a reas e Zoue gand kement a garantez, ma voe skoret spered an holl. Hag e komzas evelse. « Ret eo d'in, emezan, abalamour d'ar re o deus va darempred er vro-man, dizalei d'oc'h eur c'bras kaer am eus bet abred digant Doue. Pe'don o studia e Ajen, ar Werc'hez Vari en em ziskouezas d'in epad m'edon pouinet gand eur barrad anken. Goude beza va frealzet, e roas d'in, a-berz he Mab, kurunenn ar glanted, am eus diswallet met bete-vrennan. N'am eus morse, nag ez yaonank na kor, grêt pecheit ebet eneb ar vertuzez ; heñ diskleria a ran dirag ar Zakramant. »

Ma c'houllennas komz evelse, eo, var a gredan, o veza ma voe tamallet e goan e Ajen gant teodou fallakr da veza grêt pechejou divalo. Mat o d'ezan en em zidamm eur wech c'hoaz, evid m'o defe e gentellou muioc'h a bouez dirag an dud.

Goude beza kommunit, e c'houllennas sakramant an Nouenn.

Santout a rae e tene e eur ziveza, hag e lavaras da Janned ar Gall : « Postat a ra ar maro d'in, met teir bonn vras am eus c'hoaz da c'houznavas araok kuitat an douarn-man. Beilhit ha likit tud da veilha noz deiz. »

Epad e glevnet, e c'houllennas lenn d'ezan benned ar Bassion e brezoneg, rak o pleustri war boullou Hor Zalver, e'ch ankoune'hae e re. Janned ar Gall a lenne d'ezan ive kantikou brezonek. Met, souezet o wilete pegement a zon en doa he mestri rag ar maro, a lavaras d'ezan eun deiz : « C'houi ha n'ho peus grêt nemet vad epad ho pubez, a gren evelse ? » Selaouit, emezan ; an drouk-speredou a glask d'ar mare-man ober gwella ma c'hellont evid hor c'holl. N'euz forz peger zantel eo bet ar vuzhez, ennoep e riski bras, ma ne vezomp ket harpet gant Doue. Ni, tud desket var an skiantehou sakr, a vez alies tenlet enep gwirionezou ar feiz. Hon enebour ijinek a glask hon lakat da goll feiz pe da goll fuzians. Ma ne c'hell ket, e lak dirag hon daoulagad hon oberon mat evit m'en em blijimp o sonjal enno. Ha setu awalc'h evit koll ar brasa senti eus ar bed. Rak-se, bep hanter eur, lennit d'in e brezoneg kantig ar feiz, grêt d'in diskleria e kredan misteriou ar relijion, ez eus tri Ferson e Doue, eo an eil Ferson en em c'hort da ha maro var ar goaz evid hor zavetei, ennan e gred e sakramant an Aoter. Da c'houde lavarit d'in an enor bras am eus bet digant Doue o veza va

galvet d'ar velegial, Grit d'in sonjal em leziregez, em fechejou, grêt d'in goullenn pardon ha diskleria va fuzians e Doue. Va zikouri da zevel a spered varzu Doue dre bedennou evel ar re-man ; e Tad eternel, va cheunerezi dre ho kaloud ; Ma Doue holl-c'halloudek, va sklerijennit gand ho furnez ; Spered glan, va entanit dre ho karantez, Treinded Sakr, grêt eus va c'hollon eun noter d'oc'h da jon enni evid ato. Jezus, gwir Vad Doue, va c'hariz en ho koster toull, beuzit va fechejou en ho kwad. O Gwerc'hez glorios, alvokadez ar bec'herien, manna a druz-garez, pedit evidon da eur va maro. Sant Josef, tad mager da Jezus, sant Mikael, va Eñ mat, sant Yann Vadezour, santez Barba, sant Kaourintin, va zikouri bremen ha da eur va maro. »

Setu aze penaos e'ch en em brepare d'ar maro. Tamall a rae leziregez meur a veleg a leze, goude au Nouenn, ar re glan o-unan da stourm ouz ar c'hennved, ouz ar maro, ouz an drouk-speredou a ziskouez o holl c'hoummer d'ar marose. Evite eo en doa grêt an tamn skrid da zekki d'ar gristenien penaos en em brepari d'ar maro.

Ar maro (5 a vae 1652)

Er penn kenta a ebel, Mikael an Nobletz a voe var e dremenvan. Epad pemp devez e chomas evelse, hag edod da bep eur var c'heil eus e varo. Hag en eun taol e wellas, e c'hellas debri ha keneret eun tamn nerz. Epad ar wellaenn-ez e roas da eur paour e zoudanenn eur gwenned bennak en doa c'hoaz en e vanch. Met e kur e reas an aluzen-z, d'ar zil, epad m'edo an dud en oferen.

Eun nebeut devezioz goude, d'ar 14 a ebel, e kouezas adarre hag e voe a-nevez var e dremenvan. E gorf a oa skorret, evel pa vije bet goloet a erc'h. An holl a gwe d'ezo edo en drom o vont da vervel. Ne denne mui e alan, e gatou ne lamme mui. Hevel oa ouz eun den maro. Met dont a reas adarre buhez d'ezan, hag e c'hellas a-nevez ive tenna e alan, hirval ha komz. Ar fallaenn-ez a badas ive pemp devez.

An Tad Mener, pa glevas oa fall fall e vestr, a zirdas eus Douarnenez gand an Tad Bernard. Kaout a rajont ar c'hlanour gwelloc'h eget na gredent. Laouen bras e voe hennan o welet an daou vignon-ez en e gichen. Chom a rajont gantan eul lodenn val eus an noz da gomz outan ha da gana d'ezan kantikou brezonek. Goullenn a reas kelou divarben ar misionou hag e voe eurus o klevet ez ae al labour var araok.

An daou Dud, o kredi e c'helle c'hoaz ar c'hlanour heva meur a zervez, a giteas Konk evit mont d'o mision. D'ar re c'houllenn digantan perak n'en doa ket lavaret d'ezo chom beleg ar fin, Mikael a respontas : « Unan anezo a vezo em c'hichen. »

A-raog e varrad diveza, e voe brao a-walc'h epad eun devez bennak, hag e c'hellas lavaret-penaos hag e pelec'h e c'houllenn beza seblotet ha beziet. « Ra vezo lezet, emezan, va zhorf epad tri devez e chapel sant Kristof, chapel ar beorien, ma c'helle va mignoned dont niverus d'an

gwelad ha da bedi evidon. » Ha da Janned ar Gall e kemennas : « C'hw'i a glasko va mignoned, beleien ha re all, ma z'ant da bedi evidon da japel santez Barba. » Goullenn a reas kas e gorf da Iliz Lokrist evid beza beziet e traon chapel sant Tujan, etouez ar re baour. « Na lenvit ket varnon goude va maro, emezan, na zougit ket dilhad koun evel ma ra tud ar bed, met dilhad gouel, ha bezit laouen, evid ober disbenvel diouz ar bed. »

Nebeut amzer goude, d'an 2 a vae, e rankas ober ar c'hougad diveza gand ar maro. Rust e voe an abaden. Eur c'houllenn a c'hwad a voe var e gorf, evel var hini Hor Zalver er jardin Olivet. E gorf, en diabar, a oa evel deuet gand an Iat. Met, e kreiz e boullou, ne lezas ket eur glennadenn, ne c'houllenn nemet eun dra : gouznav muioc'h c'hoaz.

Antronoz, 3 a vae, e kasas kemennadurez d'an Tad Mener a oa o prezeg eur mision e bro Leon, ugent leo bennak diouz Konk. Den ebet ne gred e c'helle digouezout abred a-walc'h. En devez varierez, 4 a vae, ar c'hlanour, epad div eur, a voe evel dibradet diouz an douar. E zremm a oa lugernus ha kaout evel hini eun dou yaonank, e zaulagad a zelle er memes lec'h gand eul levenez vras meurbet. Lavaret e vije bet eun den eurus er baradoz o sellet ouz kaerder Doue. — Neuz eo e c'hellas eul livet dont d'ober bunn e batrou.

Pe zeus ennan e-unan adarre, Janned ar Gall a c'houllennas digantan piou en doa gwelad : « Va Mestrez vat, emezan, an Hini am frealzas gwechall e Ajen ; deuet eo adarre d'an frealzi. »

Koulkoude, d'an abardaez eus an deiz-ez, an Tad Mener en em gavas e Konk, Mikael an Nobletz a zellas outan, laouen holl, hag a c'houllennas eur wech all c'hoaz an absolvenn. « No a dremennas penn da benn o pedi hag o prederia. Antronoz, 5 a vae, ar c'hlanour a zastumas an holl nerz a jome gantan evit kinnig da Zoue e galon. Ar zil oa. Ar c'hleier a c'hvale an dud d'an oferen. Mikael, a vouez izel, a bede Hor Zalver, ar Werc'hez, ar zent, pokat a rae d'ar groaz a ginuige d'ezan an Tad Mener, hag evelse, goulladig, eo e reas e huand diveza, d'an oad a 75 vloaz.

Kekent ha ma tremennas, e voe leun an ti a c'houz vat, c'hoaz vat a zeue diouz e gorf, e zillhad, plouz e wile. Ar re her seblias o deus heñ diskleriet.

Goude ma voe gualc'het ar c'horf, e voe gwisket, lakeet d'ezan e zillhad oferenna ha diskennet en eun arc'hel dister, lezet diroz, ha kaset da japel sant Kristof, hez-vez m'en doa Mikael goullennet.

An oferen bren n'oa ket ebuet c'hoaz, ha n'oa ken beleg nemet an Tad Mener endro da Vikal.

Bunn ez eus ar c'hollou, ha pa voe klevet ar glas goude an oferen, an dud a zirdas da klevet sant Kristof, da welet ar beleg sant. An holl a c'houllenn pokat d'e zaouran, d'e dreid, touch ouz e gorf eul leon oferen pe eur chapellet pe eun dra bennak. Ar chapel a voe leun a dud epad an tri devez. Ret e voe zoken lezet digor an nor epad an noz.

J. U.

**Tud vat a Vreiz-Izel hag a Vreiz-Uhel
ha c'houi dreist-holl, patroed yaouank,
ma fell d'oc'h anaout ar gwellaennou ho peus ezom
da zigas en ho Pro,
it da dremen an 12, 13, 14 ha 15
a viz Gwengolo da Vontroulez.
Montroulez a vo en deiziou-ze
eur mor a gan,
a c'hened hag a levenez.**

Kenteliou war al labour-douar

Ar shaot du pe an dua

An holl a anavez ar c'hlenved-se: ar greun a dro e ludo hag a zav ganto c'houez ar pesked brein. Eul louedenn eo ivez, ar peiz a deu da veza er winizenn hag a ro had er greun goude beza o debret: al ludo eo had al louedenn vunutze.

Aes a-walc'h eo en em viret diouz ar c'hlenved-ze: n'eus ken da ober nemet glesia an had gwizinn gant kouevr-souftek, da lavaret eo gant louzou an ed, evel m'hen anver, war ar miz, peurliea. Eur c'hlenved all a zo, henvel a-walc'h ouz an dua, nemet ne vez c'houez ebet gand ar greun taget; eul louedenn anvet, e latin, *ustiligo cario*, eo a vez penn abell ar c'hlenved-ze e lec'h egile an dua gwizinn, a vez roet gan al louedenn anvet: *tilleta caries*. N'eus ket kalz a ouennou gwizinn hag a daple ar c'hlenved diveza-man; evit miret ouz ar gwizinn d'e dapa gwella 'zo d'ober eo o glesia gant dour tomm 50'; gwizinn hor bro ne grog ket ar c'hlenved-se enno, a gredan, ha setu perag ne 'z an ket da jom da boueza warnan pelloc'h.

Klenved ar c'har

Pa vez re zrus an douar pe re voan ar c'holo e vez stoket alies an cost. Gant kulo krenv ha douar didemp e stok, a-wechou ivez, ar gwizinn, pa vez taget gant klenved ar c'har a zo roet gand eul louedenn all a vez graet *Ophtiolis graminis* enni.

N'eus louzou anavezet mat ebet c'hoaz a-ench ar c'hlenved-ze. Koulskoude, hinienno, o deus bet souhet o gwizinn e dour trenk souftek hag o c'holo n'int ket bet ken stoket ha re ar re all gant klenved ar c'ar.

Greun dect

Pa vez tomm ha sec'h an hanv ar gwizinn a deu da zavrev kalz re vuan, pell a-raok m'eo peurgrouet ar greun; ar re-man a jom dister, met n'eus klenved ebet warno; eur gwall zarvoud a zo digouezet ganto ha netra ken hag a vez anvet e *echouage*, e galleg. En hor bro-ni, e vez glao alies, hag an darvoud-ze n'eo ket anavezet nemet. D'hen diarbenn, gwella a zo d'ober eo gouint gouennou gwizinn prim.

C'houil an ed. (Elatar segetis)

An amprevan-man, eur wech ma teu da c'houil, ne ra ket kalz a zrog. Met, pa ne vez anezan c'hoaz nemet eur prenv, e tebr gwizinn ar gwizinn hag a-wechou e ra gaou spontus. Klasket ez eus bet louzeier en e eneb, n'eus kavet hini mat ebet c'hoaz; ar gozed hag al labouder, mignoned vrasa al labourer douar, a zebr ar prenvded-luzig ha ra evels mil vad d'eur parkad ed.

Bez eg eus amprevan all hag a ra gaou ouz ar gwizinn met ne daly ket ar hoan komz anezao pa ne anavezet louzou ebet da zont a-benn anezao.

Al louzeier fall

Eun drouz eo trempa ha labourat mat an douar pa ne zav ennan nemet louzeier fall. Breman, pa n'eus ket kalz a zikour en tiegeziou, ne dizer ket c'houennat an ed, hag an ed ne vezont ket gwerzet ker a-walc'h, ken nebet evit ma c'helled paea tud d'o c'houennat. A nevez 'zo eo bet kavet an tu da lara al louzeier, heb re en holl a vizou, o c'hlebia an douar gant dour trenk souftek.

Hed eo kaout eun donell graet evit fuilha an douar-ze. Dont a ra d'eun tamm bras a arc'hant c'hoaz ha n'eus nemet an tiegeziou bras hag a vefe gouest d'her prena. An emgleioz (*syntheticus*) koulz hag ar parrezioz a vefe mat d'ezao kaout tonelloz evels da bresta d'o zud.

An dour trenk ne ra gaou ebet ouz an ed ha 10 pe 20 dre gant a c'hroun a vo eostet muioc'h; an eltezen, an askol, ar piz-logod a vezo lazet; ar boren hag al treuz-got avat a zo d'iesoc'h o diehoenna.

AN HEIZ

Talvoudus eo ivez an heiz. Gwir eo ne raer ket ken a vara heiz evel gwechall; koulskoude, pa vez bloaveziou fall a winiz e vez lakel heiz a-wechou etouez ar gwizinn da gas d'ar vilin hag ar lara graet gant bleud gwizinn ha bleud heiz n'eo ket fall tamm ebet.

Evit ar c'hatal n'eus greunenn ebet gwelloc'h eged an heiz; ar moc'h a vez maget gant heiz a vez mat kenan o c'hig ha kalet ha gween an druz ennan; malet ha mesket gant dour klouar, bleud ha brenn en eun donez, an heiz a zo mat kenan da lakat ar zaout da rei jez. Dara heiz a zo mat kenan da heiz e lec'h kere'h d'ar c'hezeg hag a zo zoken hag a ro heiz e lec'h kere'h d'ar c'hezeg hag a Aljeri a vez maget an holl gezeg gant heiz hepken.

Daou seurt heiz a zo: heiz hag o deus diou renkenad c'hreun hag heiz hag o deus c'houez renkenad c'hreun. Etouez ar re-man eman heiz Enez-He a vez hadet e miz meur hag a zo mat kenan da rei greun; a heiz gouz a vez dare abred hag a c'heller da hada a-raok ar goaz; — Heiz suez-amer hag a vez hadet e miz meur pe e miz Ebrel; — Heiz Albert, eur ouenn mat tre da hada pe a-raok ar goaz pe en nevez amer.

An heiz Chevalier a zo eun heiz a zion renkenad c'hreun; dreist da ober hier, Heiz ar *brasser Sotof* a ro greun mat tre ivez.

Ar Bier, evel a ouzoeh, a vez graet gant heiz ha gant houpez (houblon, e galleg).

Peurliea e vez hadet an heiz goude ar gwizinn; evel ar c'herc'h an heiz a zo mat da zebr ar peiz a jom a demz warlerc'h ar gwizinn. Koulskoude, figuoc'h eged ar c'herc'h eo an heiz war an temz ha war an douar; ha rak se ma ne c'houeuzer ket an heiz goude eun eost temzet mat, evel ar boued c'hatal, e vezo red rei tel pe vizin d'ezao.

Pa vezo bet temzet an douar, er bloaz a-raok, gant 100 lur azot soudek ha 200 lur super pe gaoc'h-houarn, dre zervez arat e vezo temzet a-walc'h.

Kizidik eo an heiz ouz al louzeier fall ha rak-se, pa c'heller, eo mat, a-raok hada, tri diou wech an douar, evit hen dilatri.

Pe goulz hada?

Red eo hada an heiz gouz e miz keru pe zoken e miz du evit rei amzer d'ezao da veza krenv a-walc'h a-raok ar yenenn.

Heiz meur a c'heller da hada e miz ebrel ha zoken e deiziou kenta miz mae. Koulskoude, arabad gortoz eun sot formus eus an heiz gouezet ken divezat; gwelloc'h eo o hada e miz meur pe zoken e dilenn miz c'houeuzer.

Hadet e vez an heiz evel an eostou all; koulskoude, p'eo gwir eo to o greun red eo o douara doua ha stank; n'eo ket re hada douar c'hant lur dre zervez arat.

Evel an eostou all red e vezo ivez c'houennat an heiz o freuzia hag o roulotera.

Douarou gwizinn du.

N'eus ket pell abaoe ma vez gouezet gwizinn du en hor bro; met kemeret o deus avat eul lec'h bras etouez hor eostou.

Graet e vez ganto fars ha yod anavezet gand an holl; mat int ivez da rei d'ar c'hatal ha dreist-holl d'ar moc'h. Arabad avat rei gwizinn du d'ar zaout na d'ar c'hezeg rak o lakat a rafent da goll o jez.

Daou seurt gwizinn du a c'houeuzer: Gwizinn du, demzu pe arc'hantet, hag eo ar re wella; kemeret o deus lec'h ar gwizinn du, gouezet gwelloc'h d'zo kalz falloc'h ha ne vez ket kavet anezao ken breman.

Gwizinn du a vro Tartar, mat hepken evit ar moc'h, c'houerou kenan o bleud; ne vez ket gouezet kalz anezao en hor bro.

Ar gwizinn du.

Ar gwizinn du n'int ket figus war o douar; n'eus nemet an douarou re bouner ha ne bilifent ket d'ezao, en douarou-ze e roont kalz kolo ha kalz deliou met nebet, nebet a c'hreun.

Pilout a ra d'ezao an douarou nevez difraostet; an eost gwella int eved an douarou-ze.

Mouget e vez al louzeier fall dindan ar gwizinn du; mat int eta da zilaista an douarou lous. En eur ger, dont a ra mat ar gwizinn du goude pep seurt eost ha mat eo o lakat a-raok pep seurt eost. Gwizinn du, daou vloaz dioc'h, e douara a zo, a zo eun dra vat evit dilasta an douarou-ze. Ar gwizinn du a c'houleut douar liot; mat e vezo eta trei ha douara gant an tumpet epal ar gouz ha freuz an douar c'hoaz, meur a wech, epad an nevez amer, gand ar freuzere (extripteur) pe gand ar freuzou.

Arabad eo hada re abred ar gwizinn du rak an distera reo a ra droug d'ezao had e gor a-walc'h d'ezao da zev, en hor bro; ar gwella koulz da hada gwizinn du eo o etre ar c'henta hag ar c'houez eus a vezeven, evel a lavara ar re goz, ha gwech ebet n'o deus lavaret eur wirionez ker rik.

Hadet e vez peurliea ar gwizinn du gand an haderezh ha mat eo hen ober; koulskoude ne blij ket d'in ar c'hiz da douesta an had gand al ludo nag evit ar gwizinn du nag evit ar rabez, an irvin hag ar boued c'hatal all; kalz gwelloc'h eo hada an had hepken, evel m'her gran gwelet mat eo kalz gwelloc'h ober er c'hiz-se. Fuillet e vez al ludo, war an douar, a-raok hada ha goudeze e vez doueret an had gand eun had freuzou. Ne jom ket pell ar gwizinn du eo douar ha setu perag ez eus ezom da rei d'ezao boued aes da zebr evel ar super hag al zout soudek. Kant lur azot soudek ha daou c'hant lur super a zo eun temz mat evito pe c'hoaz, hag a zo gwelloc'h, tri c'hant lur ludo touezet evel m'hou eus lavaret kemeret.

N'int ket da rei fosfat d'ar gwizinn du nag ar peiz a nevez ludo ha n'eo nemet fosfat livet e du hep talvoudeger ebet. Peurliea, ma n'eo ket atao, al ludo-uz ne reont vad ebet d'ar gwizinn du.

Arabad douara re ar gwizinn du ha rak se arabad m'eo o hada dindan ar boum; mat eo avat o hada gand an douar hag o goll gand ar freuzou. Ker mat pe welloc'h eo gouint ar gwizinn du evels eged gand an haderezh, ya, mar d'int hadet gand eun hader ampart.

Klevet ho peus, hep mar ebet, lavaret zo a-walc'h kaout eun tokad gwizinn du da hada eur warenn; mar d'eo bras ar warenn eun tokad bras a zo a-walc'h ha mar d'eo bihan, eun tokad bihan. Ne alian den ebet da gred' traou evels: m'ho peus c'hoant da gaout eun dra bennek en ho touarn, hadit hanter kant lur had, dre zervez arat. Pa ne vez ket kompez an douar, evel en douarou nevez difraostet, red eo hada stankoc'h ha teul rei 60 lur pe 70 lur dre zervez arat.

Ar gwizinn du, panele ar vez a zionnefe en eun novez.

Gwir eo, pa vez gleb a-walc'h an douar pe pa vez glao, trumm goude ma vez bet graet ar c'houeuzer, ar gwizinn du a zionan dillo; met pa vez seehor vras e lakont pell amzer, a-wechou, da zionan.

N'eus netra 'ho holl da ober epad ma sav ar gwizinn du, rak pa vezont stank a-walc'h e vougout al louzeier fall. Epad ma vezont e bleun, an avel grev, an amez, ar gloz, ar c'hor hag ar zeehor re hadus a ra kalz droug d'ezao.

Pa vez mat ar gwizinn du e vez eostet daou vil lur c'hreun ha pemzek kant lur golo dre zervez arat. Trouc'h a vez graet ar gwizinn du gand ar falz; pa vez bet hadet irvin etouez ar gwizinn du — hag eur c'hiz vat eo, rak a-wechou e lec'h eun eost e vez daou, eun eost mat a irvin hag eun eost mat a winiz du, — eo red o zrouc'h gant ar falz. Pa ne vez ket a irvin en o zouez e c'heller o zrouc'h gant ar falz/herez pe gand ar vederezh. Labour vat a vez graet gand ar binvachouze pa vez kalz a-walc'h an douar; anez avat e vez diframmet ar plantennou, gwizioz hag all, hag ar benveg binvachouze a-walc'h a rank eun a-zav.

Pa vez mat ar gwizinn du e vez eostet daou vil lur c'hreun ha pemzek kant lur golo dre zervez arat.



Edou all a zo evel ar maiz, ar meli, ar sorgho, met ne vezont ket gouezet kalz e Breiz; e Bro-Wened koulskoude e vez hadet meur a dachennad meli; ar maiz hag ar sorgho a vez trouchet ez-ch'as; komz a raimp anezao pa gomzimp eus ar boued c'hatal.

Talvoudus e vefe gouint fa rag ar greun a zo eur vad-goudeuz eus an dibob evit ar c'hatal.

Evit larda moc'h n'eus netra gwelloc'h eged ar fa poaz; eul lur anezao a dale da nebuta kement ha diou lur heiz.

Mat eo rei fa d'ar zaout; diou lur fa malet touezet gant dour klouar a zo eur gouleuz eus ar c'henta da eur veeoc'h hag a lakao he jez da greki kalz.

Ar fa gouezet evit ar c'hatal a zo kalz bihanoc'h o ment eged ar re a c'houeuzer evit an dug; c'houero int ivez, eun tammig; rei a reont muioc'h a c'hreun, avat, hag uheloc'h eo o blant.

Daou seurt a zo anezao: fa gouz ha fa meur; ar re genta a hader e dilenn miz gwengolo pe e miz here hag ar re all e miz c'houeuzer pe e miz meur.

Ar fa a c'houleut douar krenv. O hada a raer gand an haderezh, a renkenadoz, douar agret santimetre etrezo. Red eo hada 200 lur had dre zervez arat. Roet e vezo d'ezao tri c'hant lur super pe gaoc'h-houarn, dre zervez arat; ezom ebet a drempt azotek. Red eo avat o c'houennat eur wech; met ne vezer ket pell evit hen ober p'eo gwir int hadet a renkenadoz. Ar fa ne vezont ket pell evit goli o douar ha mouga a reont raktal an holl louzeier fall a vez en o zouez. Eostet e vezon e miz eost c'houez e vezon pe gand ar falz, pe gand ar falz pe gand ar vederezh pe gand ar falz/herez evel an eostou all; savadelle e vezon goudeze evel ar gwizinn du.

Evit o douara e ranker pellat an daboulin douar ar c'houer rak brasoc'h eo ar greun eged re an eostou all. N'eus netra gwelloc'h eged ar fa da c'houint a-raok ar gwizinn; netbet e vez an douar gantu p'eo gwir eo red o c'houennat; biotaet e vez an douar ivez gand o gwizioz ha pinvitiaket gand o azot p'eo gwir eo ar fa eus an hevelep rummad louzeier gand ar melichen hon eus komzet anezao en eur goue eus an temzo.

Alla a reomp eta al labourer-douar da c'houint eun tamm bihan a zour e fa evel hon eus graet hon-ennan hevelne hag evel hon eus sonj da ober c'hoaz er bloaz a zeu.

Talvoudus eo ivez ar fa da drouc'h ez-ch'as da ober boued c'hatal; komz a raimp anezao pelloc'h pa gomzimp eus ar boued c'hatal all.

Ofier CHEVILLOTTE.



WAR DRO AR RE GLANV

Gwelet ho peus alies ar vedesined o kemeret brec'h ar c'hlanvour, o lakat e vezid tost d'ar biz meud hag o chont sioul eur pennad, evel ma vije o sonj hag o kounta. Alies, keit ha ma ra an dra-ze, e vez eur mont gantan. Petra ra ?

E vezid a zo war eur wazienn hag a zanter o lam-mad, e tiron ar vrec'h, en tu diavaez, pa vez an dour war e bal. Ar wazienn-ze a vez santet o lammat ha, dre al lammat a ra, ar medesin a oar meur a dra diwar stad ar c'hlanvour.

Gwazienn an dud ya'ch, pa vezont en oad, a ra war-dro 60 lamm dre vuntenn; buanoc'h ez a hini ar vu-gale hag hini ar re goz. Al lammat a zo, hervez ar ye-c'hed, pe grenv, pe zister; pe der, pe c'honestat; pe eunn, pe gamm. Arabad d'an diouallerez kredi e c'hel-lo beza medesin a-walc'h da anaout eun dra bennaq diouz lemmenn ar gwad. Ne c'houlenner diganti nemet gouzout o c'hounta. Ar gount anezo a vez merket war eun tamn paper da ziskouez d'ar medesin.

Eun dra, koulskoude, a zo hag a ranker da c'honout. Goude beza bet operet pe goude gwilioudi ma santer al lammat o kreski a niver hag o koll o nerz, ma weler penn ar c'hlanvour o wenna, ma c'houlenn ar, ma kienn, gand e ziskouarn boudinnet ha gand an traoz o trei en dro d'ezan, galvit dillo, dillo, ar medesin; ar c'hlanvour pe ar glanvourez a goll gwad en eun tu bennak. Neuz, dres, eo e vezo gwelnet ma talvezid da eun dra bennak war dro ar re glav. Ar maro a zo tost, mar-teze; dre ar peza a reoc'h, dre ar peza a leveroc'h, n'it ket da lezel ar c'hlanvour hag an dud all da anaout ho sonj. Bezi sioul ha poagnt. Ma ho peus elter, kafein, eol kanfret, ha peadra da ober pikarion, sankit, heb an amzer, unan pe unan eus al touzoze er c'hlanvour.

Grit ar peza e vezo bet kuzulid d'eo'ch gand ar medesin rak nemenn alies a our petra dile en eun gouzout ha kuzulia a ra evel ma vije sur pesart droug a dile en eun gount.

Sur a-walc'h ma ouezit eus a belec'h e teu ar gwad ha ma c'hellit miret outan da vera, arabad d'eo'ch neza ne-c'h'et evit hen ober. Stouder, nerz-kalon ha gouzout gourc'henn, hag an neuleta a dud a vo wardro ar c'hlanvour eo ar gwella. Dre guz e vezo galvet buan, buan, beleg ha medesin, hep spounta ar c'hlanvour. Hag arabad d'eo'ch spounta h'oc'h unan o lenn kement-man rak n'eo ket eun dra d'eu eun gount bennec'h eo !

Diou pe deir gwech bennec'h e kountoc'h lammat gwazied ho klanvour hag er memez amzer e lakeoc'h d'ezan an thermometer da boueza e derzien. Lammat ha terzien a vezo merket war eun tamn paper da ziskouez d'ar medesin. Ar gwella zo eo kount eur baperein roundennet anvet « feuille de temperature ». Boudennou a zo warni da verka lammat ar gwazied hag huelder an derzien. Ar medesin dre eun taol-lagad war ar bapereinn-ze a oar dioc'hin meur a dra.

An diouallerez a daolo evez oustenn war zoare ar c'hlanvour da denna e alan, pe vuan, pe c'honestat, hep poan pe gant poan, aes pe ziaes, gant trouz pe hep trouz, reiz pe zirez.

Ma 'n deus paz ar c'hlanvour pe seurt paz en deus; paz sech, paz stronsus; gant kroz pe hep kroz; berr

pe hirr; a frapadou pe heb ehan; en noz pe en deiz; eur paz hag a laka da zislonka pe nann.

Hag evel ma rankit lakat a gontez ar fank hag an traoz, ar c'hroz a zo ivez da veza diskouezet d'ar medesin rak dishenvel eo e pep klenned. Evel just, ne vezo ket lakat ar c'hlanvour da grozi e pod an traoz rak neuz kroz ha traoz ne dalvesfe ket ar boan sellet outo ken.

Awechou ar medesin a c'houlennou ouzo'ch lakat ar c'hroz a-gontez da veza studiet. Ar c'hroz a zo da gas da studia evelse a zo da veza taolet gand ar c'hlanvour e-unan en eur vured vihan hag a vezo bet berved en dour. Ar boan a vezo bet berved ivez. Ar voutallin bountet start a vezo kaset gand eur medesin en eun ti-labour e lec'h ma vezo klasket gouzout dioc'hin, o studia ar c'hroz, pe seurt klenned en deus ar c'hlanvour.

M'z eus ezomm da gount traoz, nemenn a vezo digemeret eo eur pod kempenn kenan ha taolet goudeze en eur vured ker kempenn all ha ne eo enal na sukr, na louzeier, na traou a liou.

M'ho peus c'hont da ober piljadur d'ar c'hlanvour ha da vired ouz ar c'hlevezou spegus da veza spegusoc'h c'hoaz, grit alies eun tamn gwalc'h d'e c'henou. N'oc'h ket evit gouzout ped ha ped klenned a deu dre eur c'henou diskennenn. Gwella zo, evid ober ar c'hempennereze eo an dour Vichy. Muzillon ha muzonn a vezo gwalc'hel gand eun tiblad ouat soubet en dour Vichy yen. An teod ivez a vezo kempennet evelse, ma ne c'hell ket ar c'hlanvour hen ober. Pa vezo gouset d'hen ober e'ch en eun gempenn e-unan gand eur palouer-dent bet berved, dour tomm ha savon-dent; goudeze e rinso e c'henou gand dour Vichy. Digemeret mat e vez atao eur hanne dour Vichy yen da dourloukat ha da rinsat ar c'henou, dreist-holl goude beza bet evel leze.

Ma ne c'hell ket ar c'hlanvour gwalc'h e c'henou e-unan ha ma 'z eo gourc'hennet gand ar medesin, ho pezo tro da gempenn a-dao holl ar c'henou. Eur pod-dour ho peus hag eur gorenz c'homm hag eur beg gwer. An traou-man a zo dibikous evel just, hag ar beg gwer, dreist-holl, n'emmer ket o paonez e denna eus ar penn adreuz. Lakat a rit er pod ar peza a zo bet gourc'hennet gand ar medesin: dour borik, dour oxygene, perman-gant pe Vichy pe draou all; an dour a zo klouar; ar pod a zo savet diou draotad huelder diouz genou ar c'hlanvour. Nemenn a zo arezet, e benn soubet, eun torch en dro d'e c'houzoug, eur pod bras dindan e javed da rekour an dour. E alan a ranko da denna dre doullou e fri keit ha ma 'z ay an dour en e c'henou dre ar beg gwer. Dienkreze e c'hell beza: ne loungo herad louzo ebet. Ha pa rafet? Louzoiz dizanar a vezo perlitse a euid ober ar c'hempennachouze.

Met gand ar vugale ho pezo c'hoari a-wechou a kas a rankoc'h ar beg gwer etre ar vo'ch hag an dent; an dour en do netz a-walc'h d'eu en zila er c'henou hag houman a zigoro anezi he-unan. Met ehana a rankoc'h heb an amzer ha muto'ch a zaelou eged a bokou ho pezo evel ho pennou Doue.

Eul litrad dour a zo a-walc'h euid ar vugale, hag unan hanter pe zaou euid an dud en oad.

Ar Medesin.



KELEIER AR MIZ

GOUELIOU HOLL GELTIEK RIEG.

D'an 13 ha 14 a viz Eost kalon Breiz he deus tridet e Rieg. A vilieront eo e'ch en eun vodas eto he bugale en dro d'ar veia hir savet en enor da bemp skrivagner breizek, Kerampuilh, Kervarker, Brizeuk, ar Skour ha Botrel. Barzed Breiz vihan ha barzed Breiz Veur, ho det en dro d'eun diad-zean a ganas dirak eur bobl tud o fzians e amez da zont o gouenn. Leon ar Berr, er brezegegn a dile ober eno a lavar: « Pep ran-vro he deus he ezommou, dishenvel diouz ezommou he anezeien. War gement-se, Breiz-Veur a ziskouez d'omp ar skouer vat. Iwerzon a gemeras he lec'h gwirion e kreiz an Impaleried saoz, Bro-Skos ha Bro-Gembre, Enez-Manx a zo klevet o mouez e Loundain ha Kernevez ne zaleint ket da ober kement all.

Perak ne vije ket klevet, e Pariz, mouez Breiz-Izel pa 'z eus kouezet 250.000 breizad, evit Bro-C'hall war dachenn an enor?

Pep poblad eus en Europ, ar re izela zoken, o deus lakat, en e fenn, difenn o menozioù broadell. Neus den war an douar hag a viro ouzomp da gret hor vez, hor gwiskamant ha da zere'ch krenv d'hor spred-ni. Met euid o dere'ch lar lezo al lezenn c'hall ar gwir gantomp da zeki hor brezegegn da vugale hor skolioù. » D'ann bred m'jar a 2.000 den hag oustenn a vodas d'ar zadon ha d'ar zul pennadurezon an holl boblou keltiek. Gwella-ze ma c'hell Consortium an A. Saizy a Gernampuilh, Rener Gouelioù Rieg, harpet gand an A. Jaffrennou hag ar Berr, dere'ch e Breiz arc'hant ar Vretoned hag a lakat da dalvezout evit mad ar vro. Eun nevezit eus ar gwella e vero kement-se rak betek hen ar c'hant ar Vretoned a zo bet aet atao da harpa traou hag a viro ouz o traoz e-unan da vont en dro.

GOUELIOU KINTIN

Eus an 3 d'an 8 a viz Gwengolo a zeu eman gouelioù Kerveleged broadell Breiz e Kintin, renet gand an A. Markiz de l'Estourbeillon. Prezegegnou a vo gret gand an A. Jaffrennou, an A. Carne, hag an A. Saizy a Gernampuilh. Studiaennou gret an A. Yann de Guenvevan, hag an A. Ouligars a vezo lennet.

Peziou-c'hoari a vezo diskleriet.

KENDAL'CH BREIZ-ATAO, E ROSPORDEN.

Breiz-Atao a vodo he mignoned, e Rospenden, d'an 10, 11 ha 12 a viz Gwengolo. Olier Mordrel, Morvan Marchal, renerien Breiz-Atao, M. Dubamel, P. ar C'hoz hag Aboezen a gomzo.

DISPLEGADEG AR BLEUN-BRUG

Ar peza a zo da zisplega, er bloaz-man, evit kenstrivadeg an displegaded, eo gwerz kaer Kalloc'h: Va c'halon a reo e Breiz Izel, bet moulet e Feiz ha Breiz miz meurz-diveza.

DIVINAENNDOU

Er miz a zeu, gant prizioù ar Bleun-Brug e voutimp roll goumidein dividaennou 6 miz kenta ar bloaz.

BLEUNIOU BREIZ

Roet hon eus tri miz hanv d'hol lennerien da zastum d'omp anezioù bleunioù hor bro; pedi a reomp ar re o deus gret dastumennou evelse da zigas d'omp o lebourioù a-raok dibenn ar miz-man.

Er miz a zeu e'ch embannimp eur genstrivadeg nevez.

SKODENNOU

Pedi a raer ar re n'o deus ket kaset c'hoaz o skodenn d'ar Bleun-Brug. — 10 lur. — d'her c'has kenta ma c'hellit d'an A. Gouenn, Plouguerneur, C/G. 121. 83. Rennes.

EURELIOU

D'an 19 a viz Gouere eo bet eurenjet e Plougerne, J.-P. Intzani, eus a Gernouez, gand Valantina Abjean eus a C'horreker.

Ar plac'h nevez, he devoa gouezet miret, evit deiz bras he eured, he dilhad kaer a vreziderez. Hor gwella gourc'hennou d'an daou bried nevez.

BADIZIANTOU

Yvona-Mari Bouillie a gemenn d'eo'ch gand levezed he deus digoret he daoulagad glas-noz da sklerijenn ar bed keltiek.

Koant eo, e gwirionez, evel eur vleunvenn a Vreiz. He manna a zo sach, hag hi ivez.

Ker-Bliz, Perroz-Guerez, 11 a viz Mezeven, 1927.

Rener Bleun-Brug Leon, an A. Olier Chevillotte, eus a vander Kervastoue, e Plougonvelen, a zo bet badaret eur mab d'ezan, d'ar 26 a viz gouere, deiz Gouel santez Anna, hag a zo bet roet d'ezan an ano kaer a Wennael. Yec'hed ha buhez hirr d'ar breizad nevez.

MARVOU

ERBEDI a reomp ouz hol lennerien an A. Pennese, siket vras eskopti Sant Brieg ha Landnregre, eur beleg gouiziek hag eur breizad, penn-kil-ha-troad, evel ma ne vez ket gwelet kalz, hag an A. Gildat de Bronac, eus a Zinan, eur skrivagner spredok, azer ar Vaz-Yulan, Bois ton s'ing, hag Franche-Epée, maro er miz tremen.

Petra vo Gouel ar Bleun-Brug euid ar vu-gale

I. — Bleun-Brug ar bloaz-man eo dreist-holl Bleun-Brug ar vugale. En ho dilhad kaera e teun ar vugale d'ar goudeze. Eun ofereñs-bred, gand tri beleg ouz an aoter, a vezo kanet evito da 8 eur e liz Sant Vaz.

II. — Da 9 eur, e paeroniaez Sant Vazrin, e vezo prizioù da c'hounit, d'ar re anezo a ouezo gwella lenn brezegegn ha kana.

a) Laket e vezint da lenn eur pennad pe bennad eus Buhez ar Zent an A. Perrot, pe hini an A. Moal, eus Lez ar Gouere an A. Uguen, pe eus Liv-pedennou an Duchenn-ti Gullivier ha Frellec. Dibab a raint al levr a garint.

b) Goudeze e vezint lakat da gana unan pe unan eus Sonioù Feiz ha Breiz pe eur c'hantik bennak.

III. — Da 1 eur ar vugale a en eun vodo e porz-ti-skol Itron Varia ar Vur war en Plourin, evit kemeret eno an autioù bennet o c'haso da ober tro ker.

IV. — E Koatserho e vo gret eur vodadeg evito o-unan ha diskleriet dirazo eur peza diouz o doare: Ar Brogorin. Holl e rankint gouzout kana Bro Goz va Zadou.

PAJENNAD BREURIEZ-VEUR AR BREZONEG

Evit ma c'hello ar brezoneg beva ha bleunvi dre vasa eul lennegezh dellezek a Vreiz, e renk beza reiz, unvan ha puvitlik. D'al labour reiz, unvan ha puvitlik ar Vreiz, e renk beza reiz, unvan ha puvitlik. D'al labour reiz, unvan ha puvitlik ar Vreiz, e renk beza reiz, unvan ha puvitlik. D'al labour reiz, unvan ha puvitlik ar Vreiz, e renk beza reiz, unvan ha puvitlik.

Ermaez eus Gwalarn ha Breiz Atao hor c'helaouennou ha kelaouennou-kelch a heuilh peb a rannyez dishevel: Feiz ha Breiz a zo e yez Leon, Breiz e yez Treger; Kenteleou sant Fransez a zo skrivet e meur a rannyez, nemet ne heuilh ket ar skrivagnerien anezha dre-skriva an Emgleo a lakie, da viana, evel eur gwiskad a unvanded war an holl bennadou dishevel-yez-se.

1° — En hent ar studi.

Gerlader. — Gerladerioù a zo bet savet. Ar « Petit Vocabulaire français-breton », diviet, a vezo advolet a-benn bloaz, kresket ha gwellaet (e ti Prudhomme, Sant-Brieg). E « Geriadirig brezonek-gallek » an aotrou Ernault (e ti Prudhomme) e kavor, lakiet kenver-ha-kenver, ar pep talvoudeka eus hor gerioù brezonek Leon Treger, Kerne ha Gwened. Gerioù nevez a ranker sevel mar karer ober d'ar brezoneg kerzout keil-ha-keil gant speread mat-dien. D'en em harpa da ze e kavo hor skrivagnerien war an trede levrig eus « Conseils aux Ecrivains breton » eur roll eus ar c'hentgerioù (prefixes). E « Geriadir » an aotrou Ernault ez eus bet lakiet, ouspenn, ar gourfengerioù (suffixes): -ad, -ant, -antur, -antrez, -ell, -er, -ig, -all. Da rei skouerioù war ar c'henaoz gerioù nevez hon eus savet e *Buhez Breiz* da genta, e *Gwalarn* da c'houde, eun nebeut « technologies bretonnes ». Re-all a zo war ar stern. Yezadur. — Embannet ez eus (e ti Prudhomme) eur moulder nevez eus « La Langue bretonne en 40 leçons » gant eur c'hentakrid diwarbenn ar Yez hag ar Studiù keltek. Al levrig « Enseignement du breton » gant Meuz eus an talvoudusa. Lenn ennan, dreist-holl, pp. 14 ha 15, an daoleun eus perziou mat ha fall pep rannyez. Ma karte skrivagnerien Leon, Treger ha Kerne tec'hout diouz perziou fall o rannyezou ha staga ouz o ferziou-mat, e vefe savet en eun taol ar Yez reiz hag unvan. D'o ceuna en hent-se eo hon eus embannet al levrioù gant « Conseils aux Ecrivains bretons » (Emgleo sant Iliud) hag e varutellomp aman, e sell d'ar Yez unvan, ar skridoù nevez a vez degaset d'omp. Pedit a reomp adarre an embannerien da gas o embannadurioù nevez d'an aotrou F. Vallée, 23, rue Saint-Benoît, Sant-Brieg.

2° — En hent an Emgleo.

Da unani, da viana evid an diavaez kement hag e c'heller hent ober, skrivagnerien Leon, Treger ha Kerne, ez eus bet savet eun doare-skriva unvan: doare-skriva Emgleo ar Skrivagnerien, Heuliet e vez gant Feiz ha Breiz, Breiz, embannadurioù Emgleo sant Iliud, penna-douzo eus ar « C'houerier », hag all (1). A-hent-all, an *Notennoù diwar-benn ar Getted* ha, war o lerc'h, ar *Skelta* o deus roet eur skouer eus eur yez lennekk unvan. Heuliet eo bet ar skouer-se eus ar gwella gant *Breiz-Atao*, Gwalarn ha levroneg Gwalarn (2).

(1) Ne heuliet ket c'hoaz piz a-walc'h reolenn an Emgleo diwar-benn an doare-skriva (treza) a zo heulien e noll merka diwan etre vogalennoù (evel er ger gallek *mais* e-kenver *mais*).
(2) Erheldi start a reomp diweza embannadurioù Levroneg Gwalarn, An aotrou Rimbocher.

Bodadenn hor « Breuriez ar Brezoneg » a vezo graet e Montroulez da gever kendalc'h ar Bleun-Brug, d'ar meur, 13 eus ar miz-mañ, da 10 eur, e paeroniez Sant-Varzin.

Ne striver ket a-walc'h da c'hennat diouz rannyezou Leon ha Treger ar gwall-bhezioù na sav diout dreist-holl disrann etrezo. Setu aman eun nebeut skouerioù eus ar fazioù a gaver an alies: — 1° — er skridoù a yez Leon: ober gant ez, rann-verb-dilogela (particule affirmative) er frazennoù-nach: *n'ez eus*, e lech *ned eus* pe *n'eus*; ober gant en eur, e lech o, *dre, gant, war-bouez, e serr*, hag all, dirag an hanoioù-verb (infinitifs): *dre gant, war-bouez* — *studia e lesker*, ha neket en eur a zo « gefridi merka daou dra graet a-gevret: *lenn en eur vale*; disnozia an hanoioù-verb dre lakaat peb eil penn an difenn anezha: *drabi e lech d'bra, teuler e lech teuler, delc'her e lech derec'her*, hag all; kemmeska diouz skouer Treger ar rann-verb hag an displegadurioù (conjugaisons): *ar re a gar d'z ulo e lech a gelo, neuz a deant e lech e tenas*, stumma ar frazennoù-verb e galleg: *Per a lavar ar c'hoz a zo laer e lech Per a lavar ez eo laer ar c'hoz*. — 2° — Evit Tregerioù, o gwasa si eo n'ouzont ken ober gant doareon dishevel ar verb *beza*: eo, zo, vez, eus, eman. Zo dreist-holl a deu ganto eus ar falla evid eus: *eo, mar zo tud, na zo ket* (1). Gwall-vesket ar furmioù-verb, e vesker da heul ar rann-verb hag an displegadurioù. Ha setu torret da val kevredurezh ar brezoneg (syntaxe bretonne), hag ar yez war an diaoad da vont d'eun trefodad disneuz.

Da verka he hent da yez Wened evid an doare-skriva ez eus bet embannet aman warlene eur pennad ma alier Gwenediz: — a) da zigemerout an *in* evid ar son a vez distaget ganto *gu* (e lech *guo*) hag a kensonenn dirag e hag *i*; — b) da skriva ar *c'h* gwirion evel ar yezou all: *merc'h*, *Mirent o h distrest eus th: merc'h, meurh* evit *meurh*, *kembraeg maourth*, ha dalc'hent da skriva an *h* (1) war lere'h *i* evid an *l* glep. O veza ma skrivint evel ar re-all *He hier, moule hi*, hag all, ne vo ket a riski a zrouk-kemmeska er seurt gerioù *i* glep ha *ch*. Dre skriva *pi'he, sil'he, kl'he*, gant eur virgul-grech da verka an e *gwasketed*, ne vo ket a riski kennebeut-all da zrouk-kemered er gerioù-*th* evid *th*. A-hent-all, evit peb a zell tec'hout diouz gwall-techoù a zo hag a denn d'an trefodadur, ez eus bet roet alioù mat ha kentelioù reiz da skrivagnerien Wened gant an aotrou abad Goff. Studiñt int bet aman, ha mentel pourn-viñ dre ma lennont, ouspenn gwellaet yez Wened, d'he nesaat d'ar Yez unvan. Gwaz a ze ne vez ket sentet nemet ouz an alioù ker turze!

War a weler, kalz a van d'ober c'hoaz. N'omp ket zoken, hanter-hent, dreist-holl dre an diaouer a emgleo, pep rannyez o vont gant he gwall-bhegioù, ha zoken o'ch ober diouz gwasant anezha, eur yez. Evit en eus he l-varet aman c'hoaz, eman Amerz-da-zont hor Yez ha hini hor Broadelez (stag ouz ar Yez) etre daouarn ar skrivagnerien. O fedi a ran, en eur gloza, da lenn ha da studia an holl skridoù a zo bet meneg anezha aman d'he-lec'h, hag a zo bet savet d'ezha, n'eo ket da glask brud na da c'hounit arc'hant, hogen e sell hepenk d'o mad, a zo ivez mad ar Yez hag ar Vro.

Ar Sekretour: F. VALLEE.

Berniou traou chomet eus a zillere'h an Amerikaned, ar C'hallaoued hag ar Zaouan
Douteler, dilijajou, meser, lien, meubl, gwelou, hallennoù, linselloù, zote'nejoù, matalezennoù, hag all.
Ar vare'h-antez a breiz a vezo lakaet d'he k'ez.
TI LE CORRE
An ti a zo o'ch ober k'ez etre ar ruz Brantia hag ar ruz Victor-Hugo, harp ouz Iliu Sant-Mikael VREIZ.

Goullennet e ti ar marc'hadour
ar Zoavon
e galleg « Le Plus Chic »
HARR 20 47 7

Entreprises J. PLOUÉ - J. COLLIERE
36, rue de Siam BREST 57, rue de Traverse BREST
J. PLOUÉ
Déménagements - Camionnage - Transit - Transports
Calres - Wagoons - Autos Capitonnés
R. C. Brest. 60 Ad. Tél. 14-08-10-50

Evit beza asiret e mat, en em adreseñt d'ar gompagnonez
LE NORD
evit beza holl asurasonou (ar vuez, an tai, an darvoud hag all).
BOUCHÉ-PILLON ha LE GALL, 1, rue Victor-Hugo, BREST.
(Kontañt e vez brezoneg).

Klanvourien !
An efedusa eus al louzeur da grenvaat ha da buraat ar gwad eo al louzou diwar iodmor ha raz-eskern. Hogen eus an holl louzeur diwar iodmor ha raz-eskern — stank an niver anezha — ar reisa hag an efedusa dre ma teu war-eeun eus ar bezin-mor hag an eskern fresk eo, hep mar a-wel d'an holl, an ULMNIGINE MOREUL, al louzou gal-loudek-dreist, anavezet dre-holl e Breiz hag en deus saveteet kement a vuhezioù prizius.

Stalcioù Nevezioù Bras
Aux Galeries Saint-Martin
108 à 112, Rue Jean-Jaurès
KOANTA NEVEZIOU GWELLA PRIZIOU
Kaset e vez dilhad goret, en anezha, ha graet e vez, goude kemeret ar peñt, dilhad nevez evid ar wazed hag ar bantred yaouank.
DREIST EVID AR MEZERACH DU HAG A LIOU
Evit an dud diwar ar maez

Mammou tiegezh, ha d'oc'h bugale blinik, disliw, fall da grenvaat ha diwezet da greski, pe merched diwez d'ez d'eo d'o oad-krenn,
Maouezet digouezet gant tro an oad, na droialit ket da gemer an ULMNIGINE MOREUL, aozet gant an D' en Apotikerezh Th. MOREUL, loreet gant Akademi ar Medecine, ar pezh a ro testennoù war e ouiziegezh. Kasit ho kwad, ho skopadennou, ho troaz d'ar Grande Pharmacie MOREUL, Landerne.


AUX
DAMES DE FRANCE
95, 97, 99, Strad Siam, BREST
BRASA STALIOU ER VRO
NEVEZIOU :- DIANKACHOU-TIEGEZ ARREBEURI :- TRAOUACHOU PARIZ
Ar vella marc'hadourez evid an izela priz
Ar marc'hadourez prenet a vezo kaset betek ho ti gant kirri dre dan.
Tud an ti a oar Brezoneg

Hadou potach ha brouskou, hadou bliemioù
Hadou dibadet eus ar gwella tiez
TI A. HUON
Savet e 1840
L. AUDREN, DEUT WAR E LERC'H
17, Strad Siam, — BREST
Télég. AUDREN-GRAINES-BREST Téléph. 5-35
BINVIU - PESKETA
Kerdin - Sifell'a bep seurd
Brezhoneg en ti TI A FIZIANS R. C. Brest 49

Pommad Bleud
NOELLINE
a bare Ruzderioù ar vugale NEVEZ-GANET
Ar Pommad Noelline a zo ar gwella louzou ouz
SPINACH'AR BRONNOU
Priz pep louzou, 15 real.
Kaset e vez gant ar fanteur evit 20 real.
BON pour un Echantillon GRATUIT a savet ar Laboratoire NOELLINE
75, rue de Siam, Brest

CABINET BRETOIS
 104, rue de Jean-Macé, Brest
 Eno e vez dreist-all gweret ha prenet heñvelou a bep seurt. Hoci e vez diskleridiour evit neta. — Ty a filians.
 Ma fell d'oc'h prena, pe gwerzhañ, donar, dantez, pe stajou a-gwerz, li da yezh ar c'hañvar breton, eus a yezh-hañvel mat — ha kast a yezh d'oc'h roll an holl diet ha stalioù-a-gwerz, d'oc'h da c'hoer ennan ho klab.

Gofella dre vras an alar BRABANT dispar, ken anavezet
 L'Emietteuse
 e gwirionez
 Roumez
 an eler
 E. BELBÉCH, ijmaer
 LEZ-ROUJON
 E. BELBÉCH, ijmaer
 LEZ-ROUJON
 Eno dante heñvel hag an ar c'hreuz : 120, 123, 145 ha 155 kilogr.



Ali d'ar C'hounideien-douar
 Al louzerc' evit al loened o tougen hano MOREUL eo ar re anavezeta ha prizeta. Gwellast a reont o stal da vegerien-loened Breiz.
 1° POUDBE PETTORALE MOREUL, 6 fr. 50. — Eni louzou eo ouz ar strakoulhon.
 2° POUDBE BALSAMIQUE MOREUL, 6 fr. 50. — Eni louzou evit stanka an touzerc.
 3° POUDBE AROMATIQUE MOREUL, 6 fr. 50. — Da lakaat ar parvez da dremet o gwela.
 4° POUDBE CHAONNAISE MOREUL, 6 fr. 50. — Louzou evit stanka klevet ar moc'h.
 5° POUDBE SÈDE MOREUL, 6 fr. 50. — Louzou evit stanka ar fozell d'evn eboullia ha d'al leouen.
 6° POUDBE VERMIFUGE MOREUL, 6 fr. 50. — Louzou ouz ar poverez.
 7° POUDBE APERITIVE MOREUL, 6 fr. 50. — Louzou da rei hlaer da zier.
 8° POUDBE APÉRIQUE MOREUL, 6 fr. 50. — Louzou da lakaat ar parvez da c'houlen par.
 9° POUDBE OVARINE MOREUL, 6 fr. 50. — Da lakaat ar yezh da zeri.
 10° UNGUENT ROUGE MOREUL, 8 fr. — Mad da zeri c'hounideien ; evit louzou eo ouz koent an diverker.
 11° LINIMENT BRETON MOREUL, 8 fr. — Ouz ar c'hounideien, ar strakoulhon, strillemou, ha kaledennou an holl.
 12° REPARATEUR MOREUL, 8 fr. — Ouz goullou ar c'hrouc'hon : pennoù-glin dibennet, diskouz kiget hag all.
 13° ANTIPARASTHIE MOREUL, 8 fr. — Ouz klevijeou ar c'hrouc'hon : dabou, dorez, rous, haou.
 14° BRUVAIGE MOREUL, 8 fr. — Ouz ar c'hounideien hag ar gwerz-gand ar c'hounideien.
 15° METZÉRIQUE MOREUL, 8 fr. — Da hana ar c'hounideien diwar ar boued glas.
 16° LACRAPHARINE MOREUL, 8 fr. — Louzou ouz an touzerc ha klevet treid ar c'hounideien.
 Seflet e vez ouz an Troaz e Grande Pharmacie Moreul, Landerne.

ARREBEURI - Pennoù-erzhenti ar re vras, ar re greska, ar re gwella marched a vez kavet e ti **VICAIRE-LEVEC**
 Marc'hadon-erzhenti
 105, strada Jean-Jaurès, (e Le-Breiz gwechall) BREST
 100 a lavara, ha n'ei ena ti all eo!
 Pennoù-erzhenti a bep seurt en argerzh, argerzh argerzh
 Pennoù-erzhenti a bep seurt en argerzh, argerzh argerzh
 Pennoù-erzhenti a bep seurt en argerzh, argerzh argerzh
 Pennoù-erzhenti a bep seurt en argerzh, argerzh argerzh

Diskenn bouzellou
 Evit boza servichez mat, heb eomm da baer re ger, li, gant filians, da di ar breizad mat ma 'z eo
H. LE ROY, bet loaret e Pariz,
 hag a zo o chom er ru Jean-Jaurès, n° 139, Brest
 ar ru Bariz gwechall, harp en octroi
 Kaout a reoc'h en e di abep seurt gourizou evit gwerz, marc'hed ha bugale.
 Lerc'ier en deus ivez evit ar re a c'hell beza diest gant gwazid o diverker.
 Ober a ra ar pez a c'houlennet outan hervez gouz-he-mennou ar c'holeder.

Roit d'ho pugale
AR SIROP FERET
 ar gwella evit **KRENVAAT** ha **NETAAT** ar goad
 E. BELBÉCH, ijmaer LEZ-ROUJON



Toennou SPECK en «EVERITE»
 gret gant simant hag amiant, ha dreuz ket an douar anez, a vir ouz ar rhou koulez hag ouz an dremet.
 — **PERREADUS** —
 E pladennoù a bep mes, betek 300 gr. Eo ha prim da stapa, forz gant plou. — Treuz evit ouz ar var'adourer gret hevel.
 — Onipien 2,000 premer, en o zomz *Ponds et chauxes, Marins Nationales, Poudrière de Moulin-Bleue, usine des Produits chimiques*, etc, bet servijet en douar ar gwella.
 E gwerz e ti **SPECK**, 46, rue Jean-Jaurès - BREST (Gwechall ru Pariz, e-ost di'ar ru Victor-Hugo)
 Gwerz ar «EVERITE» vit Breiz
 Ti Speck a ro da c'hounideien an douar ivez e gwerz
 — **KEMET** zo eomm 'vit sevel lojez :
 Koad an Nord, teol « michefer » : raz, simant, pladennoù « 10 » a bep mes hag ha bep bod, betek 30 gr. Sarvez goullouet a chad mont betek 10 vloaz. — Liva) a bep liou, e hoestou o poueza etre 2 ha 10 litr, etc.
 Koadach, emmennerz, dorezoj, pemecho, etc, gret diwar vuzul.
SPECK a zav ivez tiez marc'had mat e mela pe e teol « michefer », izel hez.

Hadou evit Hada AU SEMEUR
F. HILY
 144, rue de Jean-Macé, Brest
 15, Rue Leclercq, Brest
 16, Rue Leclercq, Brest
 LANDERNE
 GWPAPAZ - PLOGASTELL-DAOLAS
 Gwerz ar merk-man
 Argoullou-hen war an' holl bakadon
HADOU, dreist-holl betezaber, karoz gwen, rut, melen, ruta, hag all.
 Starvez Depouez



GWALARN
 Kelc'hgelaouenn lennegel trimiziek renet gant Roparz Hemon
 Priz ar c'houmanant-bloaz : 20 lur
 Renerezh ha mererezh :
 Boite Postale 73 Brest (C.C. 96-38 Rennes)
 Niv. 10 - HANY 1927
TAOLENN

DANVEZ EVIT KENTSKRID EUR GERIADUR, gant R. Hemon.....	PAJENNOU
MONA GARMEZ, gant Y. ar Fusteg hag E. Berthon.....	3
GWARIZI, gant R. Hemon.....	9
ENVOENNOU TWM O'R NANT, tredet diwar ar c'hembraeg gant Aboezen.....	29
TONKADUR BUGALE LIR, adaozet diwar an iwerzoneg.....	40
ENVOENNOU BEAJ (kendalc'h) gant F. Vallée MARCHADOUR VENEZIA (divez) gant Shakespear (tr. J.-L. Emily).....	57
NOTENNOU : Hello hag an Henamzer (Gweliz Tremor) — Finskevden ha Choariva (R. H.) — Georg Brandes — An amzer hag al Lennegezh (R. H.).....	69
BUHEZ HA LENNEGEZ.....	79
LEVRIOU NEVEZ.....	92
	95

Perak e za muioc'h-mui a dud da di
ALLAIN
 BIJOUTERIE - PHOTOGRAPHIE
 BREST - 60, Ru Jean-Macé - BREST
 HAG E LANNILS ?
 Abalamour : 1° Eo gwelloc'h marchat evit ar magsajennou aruz mabrouc'h a rezo.
 2° E veant digouezet ag servichez mat gant Bretoned mad.
 3° Dir c'hado kast a vez reet war marc'had ar bizadour.
 4° Mont a ra da denna portred ar friko war al leac'h.
 5° Reiz a ra di denna portred : uan di an dud nevez ouzpen ar c'hado ag uan da bep hini ouz ar roullou.
 6° Euz argerzhennet 30 cm. X 40 a ra dan dud nevez o deuz prent o zour en e di var marc'had euz douzen portrezoj ouz an dud nevez.
Goullent diouz ar re a zo bet - Ar gwella testenit eo.

Galerie Saluden 14, rue Traverse BREST
 Papereunou livet - Skeudennou e Relijion
 Kadreun skeudennou
 Gwerennou livet. — Aozz ar gwerennou-hiz
 Kinkla an lizou
PUBLICITÉ
 Toutes les annonces sont faites à l'année.
 Un seizième de page..... 150 francs
 Un huitième de page..... 200 francs
 Un quart de page..... 450 francs
 Une demi-page..... 825 francs
 Une page entière..... 1.500 francs
 La publicité est reçue à l'imprimerie, 4, rue du Château, Brest.

AU TIGRE ROYAL
 FOULINENNOU HA KRECHIN
 BREST - 97, Strada Siam, 97 - BREST
 EUN OIBAS BRAS A FOULINENNOU A BEB ORN
 AN TREBUERHIL AN ANEA, ETE ETE ETE
 Preza a veze ar kuzh krechil lez, krechil-bras, gred, koullou, padak, ked, hag holl... ha paot e vezont prezoj mat.

Braca ha Gwella Marc'had
GWLELEOU HA MATALENNOU
 Plunv-weleou hag orilerou
 A gwerz e ty
L. LE BIAN
 39-41, Plasezenn Marcellin-Berthelot - BREST
 ARTIGLEOU HAG PRIZIOU EB HENVEL
 EVIT ar SCOLIOU, SCOLACHOU HA PANSIONOU
 Eno e vez konzet brezoneg — Ty a filians

Klennegoj ar Gwad hag ar C'hrouc'hon
 Klennegoj, argerzh, argerzh, gred hag argerzh
 Klennegoj Kan an Troaz, parvez dre an Troaz (pennoù)
 Prozedur e vez doug-ar-roullou, kolloù gwen, diwad,
 Brech'lon ha Serum, Holo Radium
 D. P. TESSONNIERE
 50, Strada Aiguillon - BREST

Klenned ar c'hrouc'hon hag an dent
L. JÉZÉQUEL
 Tenner Hent
 Loreet gant skol-vedestinerz Paris
 A denn an dent hep poan hag a laka dent nevez, war aour
 ha war gauthouk, hervez ar skouerioù diverz.
 Gwarantia a ra e labour.
 RESEO A RA :
 Desun, a LESVEVEN, Hotel Le Hour, ha ben Sadorn
 BRASPARTS hag ar FAOU. — An aotrou JÉZÉQUEL
 a souz brezoneg, ha brenez — skouer mat 'z eo gant an
 A. LAROUSSE, tenner-dent loaret evit an... eus a e d'eur da
 6 eur e c'heller mont d'e gaut, da VREST, 4, passage St-
 Martin, 74, 6/6

TAOLIT EVEZ MAT I
 N'ankounac'hait ket
 pennoù an **DILHAJOU**
 evit GOAZED, PAOTRED YADOUK ha BUGALE
 ar re Wella, ar re Gwella-Marc'had
 a vez gwerz
Aux ELEGANTS
 80, ru Siam, BREST (Gwechall ti LEVISAIS)
 Ti a filians ha breizad mat
 EUN DISKEN-BREIZ a 75 a vez reet d'ar familhon alvezuz ha d'ur
 soudardiz marc'had er breiz



Feiz ha Breiz a zo pevar real ar pez
BREST, MOULEREZ AR SKRIDOU MAT, 4, STRAET AR C'HASTELL



Ar Merour: F. GEORGELIN.